


SAMUEL
BECKETT

ECHU
AR C'HOARI



SKRID

45-46

SAMUEL BECKETT

ECHU
AR C'HOARI

Traduction de Mark Deane

SKIRA

SAMUEL
BECKETT

ECHU
AR C'HOARI

brezhoneg gant Herle Denez

SKRID

skrid niv. 45-46
diskleriet hervez lezenn
ti-moulañ prevez

embannet gant aotre Editions de Minuit
Gwirioù evit an droidigezh miret strizh
gant SKRID

golo gant Daniele Jego
skriverezañ gant Divi Kervella

priz : 30 lur

Echu ar C'hoari

Diabarzh noazh.

Amc'houlou.

*En a-dreñv, da zehou ha da gleiz, uhel, daou brenestr bihan,
tennet o ridochoù.*

*A-dal, da zehou, un nor. A-istribilh, tost ouzh an nor, he
skeudenn troet ouzh ar voger, un daolenn.*

*A-dal, da gleiz, an eil sko ouzh eben, goloet gant ul liñser
gozh, div boubellenn.*

*E-kreiz, en ur gador-vrec'h war rodoù, goloet gant ul liñser
gozh, HAMM.*

*Difiñv e-kichen an nor, e zaoulagad paret war Hamm, CLOV.
Dremm ruz-kenañ.*

Taolennadur berr.

Clov a ya dindan ar prenestr kleiz. Reut, o horjellañ war e dreid. Sellout a ra el laez war-du ar prenestr kleiz. Treiñ a ra ha sellout a ra war-du ar prenestr kleiz. Mont a ra dindan ar prenestr dehou. Treiñ a ra ha sellout a ra war-du ar prenestr kleiz. Mont a ra er-maez, ha kerkent e tistro gant ur skabolod bihan, dougen ha staliañ 'ra anezhañ dindan ar prenestr kleiz, pignat 'ra warnañ, digeriñ 'ra ar ridochoù. Diskenn a ra, ober a ra c'hwec'h paz (lakaomp) war-du ar prenestr dehou, distreiñ a ra evit kemer ar skabolod, dougen a ra anezhañ pelloc'h ha staliañ a ra anezhañ dindan ar prenestr dehou, pignat a ra warnañ, digeriñ a ra ar ridochoù. Diskenn a ra, ober a ra tri baz war-du ar prenestr kleiz, distreiñ a ra evit kemer ar skabolod hag e zougen evit staliañ anezhañ dindan ar prenestr kleiz, pignat a ra warnañ hag e sell dre ar prenestr. C'hoarzh berr. Diskenn a ra, ober a ra ur paz war-zu ar prenestr dehou, distreiñ a ra evit kemer ar skabolod evit dougen ha staliañ anezhañ dindan ar prenestr dehou, pignat a ra warnañ ha sellout a ra dre ar prenestr. C'hoarzh berr. Diskenn a ra hag o tougen ar skabolod, ez a war-zu ar poubellennoù. Chom a ra a-sav, treiñ a ra, hag e kas en-dro ar skabolod dindan ar prenestr dehou, mont a ra betek ar poubellennoù, tennañ ha plegañ a ra war e vrec'h al liñser gozh a c'holoe anezho. Sevel a ra ur golo, hag e stou evit sellout er boubellenn. C'hoarzh berr. Lakaat a ra ar golo en-dro. Memes tra gant ar boubellenn all. Mont a ra war-zu Hamm, sachañ ha plegañ a ra war e vrec'h al liñser o c'holeiñ anezhañ. Gwisket gant ur sae-gambr, ur boned kalet war e benn, ur frilien gant merkoù gwad war e fas, ur c'hwitell a-stribilh ouzh e c'houzoug, ur pallenn war e zaoulin, loeroù tev en e dreid, e seblant Hamm bezañ kousket. Clov a sell outañ. C'hoarzh berr. Mont a ra betek an nor, chom a-sav, treiñ war-zu ar saliad tud.

Clov (difiñv e sell, unton e vouezh) : Echu, echu eo, hogos echu, ret mat eo e vije hogos echu. (Ehan). Greunenn ha greunenn, unan hag unan, hag un deiz, a-daol-trumm, ez eus ur berniad, ur berniad bihan, ar berniad na c'helle ket bezañ. (Ehan). N'hellan ket mui bezañ kastizet. (Ehan). Me 'zo 'vont d'am c'hegin, pevar metrad war bevar metrad war bevar metrad, o c'hortoz e c'hwitellfe da c'hervel ac'hanon. (Ehan). Muzulioù brav, kempouezet brav, hag e chomin harpet war an daol, o sellout ouzh ar voger, o c'hortoz anezhañ da c'hwitellat warnon.

Chom a ra difiñv ur pennadig, neuze e ya er-maez. Distreiñ a ra raktal, hag e ya war-zu ar prenestr dehou, kemer 'ra ar skabolod hag a gas gantañ er-maez. Ehan. Fiñval a ra Hamm. Bazailhat a ra dindan ar frilien. Tennañ a ra ar frilien diwar e fas. Dremm ruz-kenañ. Lunedoù du.

Hamm Din-me... (Bazailhat a ra) ...da c'hoari. (Derc'hel a ra ar frilien astennet dirazañ). Kozh stanker ! (Tennañ a ra e lunedoù, frotañ 'ra e zaoulagad, e fas, e lunedoù, adlakaat a ra anezho, plegañ 'ra ar frilien ha gant aked bras e lak anezhañ e godellig e sae-gambr. Sklaeraat 'ra e gorzailhenn, lakaat 'ra begoù e vizied da douch). Hag-eñ e c'hell bezañ ur boan... (bazailhat a ra) ...brasoc'h eget ma hini ? Sur-tre. Gwechall. Met bremañ ? (Ehan). Ma zad ? (Ehan). Ma mamm ? (Ehan). Ma... c'hi ? (Ehan). O prest a-walc'h on da grediñ e c'houzañvont kement ha ma c'hell seurt krouadurien gouzañv. Met hag-eñ e talvez kement-se e ve koulz o foan ha ma hini. Sur-tre. (Ehan). Nann, pep tra ganin 'zo dr... (bazailhat a ra) ...eist, (lorc'hus) seul devoc'h

an den, seul leunioc'h eo. (*Ehan, Teñval*). Ha seul goullooc'h. (*Fronañ a ra*). Clov ! (*Ehan*). Nann, vanan. (*Ehan*). Pebezh huñvreoù ! Ar c'hoadeier-se ! (*Ehan*). A-walc'h, poent eo da gement-se echuiñ, zoken en ti-goudor. (*Ehan*). Ha koulskoude diegi am eus, diegi am eus... da echuiñ. Ya, setu dres, poent eo echuiñ ha koulskoude em eus diegi da... (*bazailhat a ra*) ...da echuiñ. (*Bazailhadeg*). Ma Doue, skuizh on, gwelloc'h 'vefen em gwele. (*C'hwitellat a ra. Raktal e teu Clov. Chom a ra a-sav e-kichen ar gador*). Flaeriañ 'rez ! (*Ehan*). Lak ac'hanon pare da vont, me 'zo 'vont d'am gwele.

Clov Emaon o paouez sevel ac'hanout.

Hamm Ha neuze, petra ?

Clov N'hellan ket bezañ o sevel ac'hanout hag o lakaat ac'hanout en da wele bep pemp munud, traoù 'm eus d'ober.

(*Ehan*)

Hamm Ha gwelet 'teus biskoazh ma daoulagad ?

Clov Nann, n'em eus ket.

Hamm Ne teus morse bet c'hoant, e-pad oan kousket, da dennañ kuit ma lunedoù ha da sellout ouzh ma daoulagad ?

Clov Sevel da valvennoù ? (*Ehan*). Nann.

Hamm Un devezh bennak e tiskouezin anezho dit. (*Ehan*). War a seblant int aet gwenn tout. (*Ehan*). Pet eur eo ?

Clov Evel boas.

Hamm (*ur jestr war-zu ar prenestr dehou*) : Sellet 'teus ?

Clov Ya.

Hamm Neuze ?

Clov Mann ebet.

Hamm Ur barrad glav 'vefe ezhomm.

Clov Ne vo ket glav.

(*Ehan*)

Hamm Hag a-hend-all, penaos 'mañ ar bed ganit ?

Clov N'eus ket da glemm.

Hamm Mat e ya ganit ?

Clov (*un tamm fuloret*) : Lavarout 'ran dit n'eus ket da glemm.

Hamm Un tamm drolik on. (*Ehan*) Clov !

Clov Ya.

Hamm Hag-eñ n'out ket aet skuizh ganti ?

Clov Hag ez on. (*Ehan*) Skuizh gant petra ?

Hamm Gant an dra... an dra...-mañ.

Clov Atav on bet. (*Ehan*) Pas te ?

Hamm (*teñval*) : Neuze n'eus abeg ebet e cheñchfe.

Clov Marteze a-walc'h ez echuo. (*Ehan*) Ar vuhez-pad an hevelep goulennou, an hevelep respontoù.

Hamm Lak ac'hanon pare da gousket. (*Ne fiñv ket Clov.*)

Kae da gerc'hat al liñser. (*Ne fiñv ket Clov.*) Clov !

Clov Ya.

Hamm Ne roin mui netra dit da zebrñ.

Clov Neuze e varvimp.

Hamm Reiñ a rin dit just peadra d'az terc'hel bev. Marnao-niet 'vi bepred.

Clov Neuze ne varvimp ket. (*Ehan.*) Me 'zo o vont da gerc'hat al liñser.

(*Mont a ra war-zu an nor.*)

Hamm N'ez ket ! (*A-sav e chom Clov*) Ur gwispid an devezh a roin dit. (*Ehan*) Unan hanter. (*Ehan*) Perak 'chomez ganin ?

Clov Perak 'virez ac'hanon ganit ?

Hamm N'eus den all ebet.

Clov N'eus lec'h all ebet.

(*Ehan*)

Hamm 'Maout o tilezel ac'hanon n'eus forzh penaos.

Clov Klask a ran.

Hamm Ne garez ket ac'hanon.

Clov Nann.

Hamm Karet 'teus ac'hanon gwechall.

Clov Gwechall !

Hamm Re 'm eus graet dit gouzañv ? (*Ehan*) N'em eus ket ?

Clov N'eo ket an dra-se.

Hamm (*feuket*) : N'em eus ket graet dit gouzañv re ?

Clov Eo !

Hamm (*frealzet*) : A, aon 'm eus bet ! (*Ehan. Yen*) Va digarez. (*Ehan. Kreñvoc'h*) Lavaret 'm eus, digarez ac'hanon.

Clov Klevet em boa. (*Ehan*) Gwadet 'teus ?

Hamm Nebeutoc'h. (*Ehan*) N'eo ket deut poent din kemer ma louzoù 'enep ar boan ?

Clov Nann, n'eo ket.

(*Ehan*)

Hamm Penaos 'mañ da zaoulagad ?

Clov Fall.

Hamm Penaos 'mañ da zivesker ?

Clov Fall.

Hamm Met barrek out da fiñval ?

Clov Ya.

Hamm (*feuls*) : Fiñv neuze 'ta ! (*Mont a ra Clov betek ar voger a-dreñv, harpañ a ra e benn hag e zaouarn outi*) Pelec'h 'maout ?

Clov Amañ.

Hamm Deus en-dro ! (*Dont a ra Clov en-dro d'e blas e-kichen an nor*). Pelec'h 'maout ?

Clov Amañ.

Hamm Perak ne lazhez ket ac'hanon ?

Clov N'ouzon ket ar chifr evit digeriñ an armel-voued.
(*Ehan*)

Hamm Kae da gerc'hat div rod marc'h-houarn.

Clov N'eus ket mui rodoù marc'h-houarn.

Hamm Petra 'teus graet gant da varc'h-houarn ?

Clov N'em eus morse bet hini ebet.

Hamm N'eo ket posupl.

Clov Pa oa c'hoazh marc'hoù-houarn em eus bet leñvet evit kaout unan. Aet on war ma daoulin dirazout. Lâret 'teus din mont da sutal. Bremañ n'eus ket mui anezho.

Hamm Ha da droiadoù ? Pa oas o weladenniñ ma re baour. Atav war droad ?

Clov A-wechoù war varc'h. (*Unan eus goloioù ar poubellennoù a sav hag e weler daouarn Nagg o pegan er bord. E benn neuze a zeu war wel. Boned-noz. Un dremm gwenn-kenañ. Nagg a vazailh, hag a selaou*) Me 'zo o vont da lezel ac'hanout, traoù 'm eus d'ober.

Hamm 'Barzh ar gegin ?

Clov Ya, 'barzh ma c'hegin.

Hamm Er-maez eus al lec'h-mañ, eo ar marv. (*Ehan*). Mat-tre, kerzh kuit. (*Mont a ra Clov kuit. Ehan*) Dont a reomp da vezañ mignoned.

Nagg Ma yod !

Hamm Farder-bugale milliget ma'z out !

Nagg Ma yod !

Hamm An dud kozh er gêr ! Diseven a-grenn ! Brifañ, brifañ, setu holl o freder. (*C'hwitellat a ra. Dont a ra Clov en-dro. Chom a ra a-sav e-kichen ar gador*). Ma ! Soñjal a raen 'oas o tilezel ac'hanon ?

Clov O n'on ket. Pas c'hoazh, pas c'hoazh.

Nagg Ma yod !

Hamm Ro e yod dezhañ !

Clov N'eus ket mui tamm yod.

Hamm (*da Nagg*) : Klevout a rez ? Tamm yod ebet ken. N'az po mui morse tamm yod ebet.

Nagg Ma yod 'm eus c'hoant da gaout !

Hamm Ro ur wastell dezhañ. (*Mont a ra Clov er-maez*) Fouzher daonet ! Penaos 'mañ da zivesker-moñs ?

Nagg Petra 'vern dit ma divesker-moñs.

(*Dont a ra Clov gant ur wastell*)

Clov Ur wastell 'zo deut ganin.

(*Reiñ a ra ar wastell da Nagg a flac'hot anezhi, a c'hwesa anezhi*).

Nagg (*klemmus*) : Petra eo ?

Clov Gwastilli spratt.

Nagg (*evel a-raok*) : Kalet eo ? N'hellan ket debrin !

Hamm Sank anezhañ en-dro en e voest !

(*Bountet eo Nagg en-dro en e boubellenn gant Clov ;
serrin a ra hennezh ar golo*)

Clov (*o tont en-dro d'e blas e-kichen ar gador*) : Ma teufe
furnez d'ar re gozh.

Hamm Azez war-c'horre !

Clov N'hellan ket azezañ.

Hamm Gwir eo. Ha me n'on ket evit chom em sav.

Clov Evel-se 'mañ an traoù.

Hamm Da bep den e vicher. (*Ehan*) Taolioù pellgomz 'zo
bet ? (*Ehan*) Ne c'hoarzhomp ket ?

Clov (*goude ur pennad preder*) : N'em eus kalon ebet da
c'hoarzhin.

Hamm (*goude ur pennad preder*) : Me kennebeut. (*Ehan*)
Clov !

Clov Ya.

Hamm An natur he deus disonjet ac'hanomp.

Clov N'eus natur ebet ken.

Hamm Tamm natur ebet ken. Amplik ez ez ganti.

Clov En hor c'hichen.

Hamm Met analat a reomp, kemm a reomp ! Hor blev a
gollomp, hon dent ! Hor yaouankiz ! Hor menozioù
brav !

Clov Neuze n'omp ket bet disonjet ganti.

Hamm Met, lavarout a rez n'eus ket anezhi ken.

Clov (*trist*) : N'eus den ebet bev en dije bet menozioù ken
korvigellek hag hor re.

Hamm Hor gwellañ a reomp.

Clov Ne zlefemp ket.

(*Ehan*)

Hamm Un tamm mat a zen out, nann ?

Clov Ur peñsead.

(*Ehan*)

Hamm Ul labour gorrek eo. (*Ehan*) N'eo ket poent din kemer
ma louzoù a-enep ar boan ?

Clov Nann. (*Ehan*) Me 'zo o vont, traoù 'm eus d'ober.

Hamm 'Barzh da gegin ?

Clov Ya.

Hamm Ha petra 'ta 'teus d'ober, me 'garfe gouzout.

Clov Sellout a ran ouzh ar voger.

Hamm Ar voger ! Ha petra 'welez war ar voger ? Mene,
Mene ? Korfoù noazh ?

Clov Va goulaoouenn o vervel a welan.

Hamm Da c'houlaoouenn o vervel ! Selaouit 'ta ! Ma, ken-koulz e c'hellfe mervel amañ, da c'houlaoouenn. Sell ouzhin ha deus en-dro ha lavar din petra a soñjez eus da c'houlaoouenn.

(Ehan)

Clov Ne zlefe ket komz din evel-se.

(Ehan)

Hamm (yen) : Va digarez. (Ehan. Kreñvoc'h) Lavaret 'm eus : va digarez.

Clov Klevet 'm 'oa.

Golo poubellenn Nagg a sav. E zaouzorn a weler, peg er bord. E benn a zeu war wel neuze. En e veg, ar wastellig. Selaou a ra.

Hamm Deut eo da hadennoù er-maez ?

Clov N'int ket.

Hamm Skrabet 'teus an douar en-dro dezho da welout ha krog 'oant da greskiñ ?

Clov N'int ket peg.

Hamm Marteze eo re abred c'hoazh.

Clov Ma vefent bet da begañ, o dije peget abaoe. (E fulor) Morse ne begint.

Ehan. Kemer a ra Nagg ar wastellig en e zorn.

Hamm N'eo ket gwall fentus. (Ehan) Met evel-se e vez atav e

fin an devezh, n'eo ket gwir, Clov ?

Clov Atav.

Hamm Fin an devezh eo, evel n'eus forzh peseurt devezh all, n'eo ket gwir, Clov ?

Clov Eo, war a seblant.

(Ehan)

Hamm (enkrezet) : Petra 'c'hoarvez ? Petra 'c'hoarvez ?

Clov Un dra bennak 'zo o tont.

(Ehan)

Hamm Mat-tre, skarzh kuit. (Gourvez a ra en e gador, chom a ra difiñv-mik. Clov ne fiñv ket, leuskel 'ra un huandenn hir ha dispiljet. Mont a ra Hamm en e goazez) Soñj' a rae din bezañ lavaret dit mont kuit.

Clov Klask a ran... (Mont a ra betek an nor, chom a-sav) ... abaoe m'on bet lakaet war an douar.

(Mont a ra Clov er-maez)

Hamm Setu ma teuomp d'en em gompren.

Gourvez a ra en e gador, difiñv-mik e chom. Skeiñ a ra Nagg war golo ar boubellenn all. Ehan. Kreñvoc'h e sko. Sevel a ra ar golo, ha gwelout a reer daouzorn Nell peg ouzh bord ar boubellenn. Goude e teu he fenn war wel. Dremm gwenn-kenañ.

Nell Petra 'zo, ma mignonig ? (Ehan) Deut eo ar mare d'en em garout ?

Nagg Kousket 'oas ?

Nell 'Oan ket !

Nagg Ro din ur pok.

Nell N'hellomp ket pokat.

Nagg Klask.

Astenn a reont o fennoù an eil war-du egile ; ne c'hellont ket kejañ, pellaat a reont en-dro.

Nell Perak ar seurt farsadenn, devezh goude devezh ?

(Ehan)

Nagg Kollet 'm eus ma dant.

Nell Pegoulz ?

Nagg Dec'h oa ganin c'hoazh !

Nell (*gant barzhoniezh ha tristidigezh*) : A ! Dec'h !

Trist-kenañ e troont an eil war-zu egile.

Nagg Gwelout 'rez ac'hanon ?

Nell A-boan, Ha te ?

Nagg Petra ?

Nell Gwelout 'rez ac'hanon ?

Nagg A-boan.

Nell Gwell-a-se, gwell-a-se.

Nagg Arabat dit lavarout an dra-se. (Ehan) Fall eo aet hon daoulagad.

Nell Hag int aet.

Ehan. Distreiñ a reont an eil diouzh egile.

Nagg Klevout a rez ac'hanon ?

Nell Ya. Ha te ?

Nagg Ya. (Ehan) Tanav eo chomet hor skouarn.

Nell Hor petra ?

Nagg Hor skouarn.

Nell Nann. (Ehan) 'Teus tra all ebet da lavarout din ?

Nagg Soñj 'teus...

Nell 'M eus ket.

Nagg P'omp kouezhet diwar an tandem ha kollet ganeomp hon divesker koad ?

C'hoarzhin a reont a galon vat.

Nell E bro Ardennes e oa.

C'hoarzhin a reont met tristoc'h un tammig.

Nagg War an hent da Sedan. (C'hoarzhin a reont adarre gant nebeutoc'h a galon c'hoazh) Riv 'teus ?

Nell Ya, hantervarv on. Ha te ?

Nagg Skornet on. C'hoant 'teus da vont tre ?

Nell Ya.

Nagg Kae, neuze. (Ne fiñv ket Nell). Perak ne yez ket ?

Nell N'ouzon ket.

(Ehan)

Nagg Cheñchet 'neus dit da vrenn-heskenn ?

Nell N'eo ket brenn-heskenn. (Ehan. *Skuizh*) N'out ket evit bezañ resisoc'h, Nagg ?

Nagg Da draezh neuze. N'eo ket pouezus.

Nell Eo. Pouezus eo.

(Ehan)

Nagg Brenn-heskenn eo bet ur mare.

Nell Ur mare !

Nagg Ha traezh eo bremañ. (Ehan) Eus an aod. (Ehan. *Hegaset*) Bremañ eo traezh, degaset gantañ eus an aod.

Nell Traezh eo bremañ.

Nagg Cheñchet 'neus da hini ?

Nell N'en deus ket.

Nagg Na va hini kennebeut. (Ehan) Ne c'houzañvan ket an dra-se. (Ehan. *O sevel ar wastellig en e zorn*) Un tamm 'to ?

Nell Nann. (Ehan) Un tamm petra ?

Nagg Gwastell. Miret 'm eus dit un hanter damm. (*Sellout a ra ouzh ar gwispid. Fier an tamm anezhañ*). An tri-c'hard. Evidout. Sell. (*Kinnig a ra ar gwispid*). 'To ket ? (Ehan) N'out ket yac'h ?

Hamm (*aet skuizh*) : Izeloc'h, izeloc'h, n'hellan ket kousket

ganeoc'h. (Ehan) Komzit izeloc'h. Ma c'hellfen kousket, 'vefen gouest da c'hoari karantez marteze. E-kreiz ar c'hoadeier ez afen. Gwelout a rafen ma daoulagad... en oabl, en douar. Redek a rafen, redek a rafen, ne bakfent ket ac'hanon. (Ehan) An natur ! (Ehan) Bez' 'zo un dra bennak o tiverañ em fenn. (Ehan) Ur galon, ur galon em fenn.

(Ehan)

Nagg (*goustad*) : Klevout a rez anezhañ ? Ur galon en e benn !

Risignal a ra gant evezh bras.

Nell Arabat c'hoarzhin eus an traoù-se, Nagg. Perak e vezez atav o c'hoarzhin diouto ?

Nagg Pas ken kreñv !

Nell (*hep izelaat he mouezh*) : N'eus netra farsusoc'h eget ar wallevurusted, kred ac'hanon. Met...

Nagg (*feuket*) : O !

Nell Eo, eo, an dra farsusañ 'zo er bed eo. Hag e c'hoarzhomp, e c'hoarzhomp, a galon vat, er penn kentañ. Met an hevelep tra 'vez atav. Ya, evel an istor farsus a zo bet klevet re alies, kavet 'vez farsus c'hoazh, met ne c'hoarzh ket mui. (Ehan). 'Teus netra all da lavarout din ?

Nagg N'em eus ket.

Nell Sur out ? (Ehan) Neuze 'maon o vont.

Nagg 'Teus ket c'hoant da gaout da wastell ? (Ehan) Mirout 'rin anezhi dit. (Ehan) Soñjal 'rae din 'oas o vont.

- Nell** 'Maon o vont.
- Nagg** N'hellfes ket ober din ur skrabadenn a-raok mont kuit ?
- Nell** Nann, n'hellan ket. (*Ehan*) Pelec'h ?
- Nagg** Em c'hein.
- Nell** Ne rin ket. (*Ehan*) 'Teus nemet 'n em skrabañ ouzh ar bord.
- Nagg** Izeloc'h eo. En toull.
- Nell** Peseurt toull ?
- Nagg** An toull ! (*Ehan*) N'hellez ket ? (*Ehan*) Dec'h 'teus skrabet ac'hanon el lec'h-se.
- Nell** (*gant barzhoniezh ha tristidigezh*) : A ! Dec'h !
- Nagg** N'hellfes ket ? (*Ehan*) Te 'garfe bezañ skrabet ganin ? (*Ehan*) 'Maout o leñvañ adarre ?
- Nell** O klask leñvañ 'oan.
(*Ehan*)
- Hamm** Marteze eo ur wazhiennig.
(*Ehan*)
- Nagg** Petra 'neus lavaret ?
- Nell** Marteze eo ur wazhiennig.
- Nagg** Petra 'dalvez an dra-se ? (*Ehan*). N'eus ster ebet. (*Ehan*) Kontañ 'rin dit istor ar c'hemener ?
- Nell** Nann, arabat dit kontañ. (*Ehan*) Perak ?

- Nagg** Evit frealziñ ac'hanout un tamm.
- Nell** N'eo ket farsus.
- Nagg** Atav 'neus graet dit c'hoarzhin. (*Ehan*) Ar wech kentañ, e soñje din 'vjes bet marv.
- Nell** War lenn Komo e oa. (*Ehan*) Un endervezh e miz Ebrel. (*Ehan*) An dra-se a c'hellez ober ?
- Nagg** Petra ?
- Nell** 'Omp bet ur wech o roeñviñ war lenn Komo. (*Ehan*) Un endervezh e miz Ebrel.
- Nagg** Ar promesaoù oa bet ganeomp an deiz a-raok !
- Nell** Ar promesaoù !
- Nagg** Ken enervet 'oas, ken eo bet darbet d'ar vag treiñ war he c'hein. E gwirionez, dleet 'vije bet deomp bezañ beuzet.
- Nell** Peogwir 'n em santen eürus.
- Nagg** (*feuket*) : 'Oa ket, 'oa ket, en abeg d'am istor an hini 'oa, ha netra all. Eürus ! Hag-eñ ne c'hoarzhez ket c'hoazh pa gontan anezhañ ? Bep gwech. Eürus !
- Nell** Don 'oa, don. Ha tu 'oa da welout ar strad. Ken gwenn. Ken naet.
- Nagg** Lez ac'hanon da gontañ ur wech c'hoazh. (*Mouezh un danevell*) Ur saoz, mall bras warnañ da gaout ur bragoù nevez evit an deiz kentañ ar bloaz, a ya da di e gemener. Hemañ a gemer ar muzulioù. (*Mouezh ar c'hemener*) "Setu, distroit a-benn pevar devezh, prest 'vo pep tra." Mat. Pevar devezh goude. (*Mouezh ar c'hemener*) "Digarez bras, distroit a-benn ur sizhun, me am eus kaoc'het ar foñs." Mat, n'eus

ket da souezhiñ, ur soubenn e c'hell bezañ kaout ur foñs naet. Ur sizhun goude. (*Mouezh ar c'hemener*) "Keuz bras am eus, deuit en-dro a-benn dek devezh, c'hwitet em eus war ar c'haol." Mat, petra 'vo graet, diaes 'vez atav kaout plas ur c'haol. Dek devezh diwezhatoc'h. (*Mouezh ar c'hemener*) "Va digarezit c'hoazh, deuit en-dro a-benn pemzektez, graet em eus dikonerezh gant an toull-bragez." Mat, diwar ar sell kentañ, un taol reut eo kaout un toull-bragez kaer. (*Ehan. Mouezh kustum*) Morse n'em eus lavaret va istor en un doare gwashoc'h. (*Ehan. Gant tristedigezh*) Gwashoc'h-gwashañ e teu an istor ganin. (*Ehan. Mouezh un den o kontañ*) "Ma, evit berraat, foeltret eo ganin an toullou-boutonoù" (*Mouezh ar pratik*) "Gast ar c'hast, Aotrou, nann, n'eo ket dereat, re 'zo re. E c'hwec'h devezh, klevout a rit, c'hwec'h devezh, en deus Doue graet ar bed. Ya, Aotrou, kement-se, Aotrou, AR BED. Ha c'hwi n'oc'h ket zoken evit ober din ur bragoù e tri miz !" (*Mouezh ar c'hemener, feuket-bras*) "Met ma aotrou ker, ma aotrou ker, sellit... (*jestr disprizus, heuget*) ...ouzh ar bed... (*Ehan*) ... Ha sellit (*jestr karantezus, lorc'hus*) ... ouzh ma brageier !" (*Ehan. Sellout 'ra ouzh Nell, hag a zo chomet difiñv-mik, kollet he daoulagad, hag e tarz h da c'hoarzhin, ur c'hoarzh skiltr, kaset dre nerzh, hag a ehan a daol-trumm, stouiñ 'ra war-du Nell adarre, hag e tarz adarre da c'hoarzhin.*)

Hamm Peoc'h !

(*Ul lamm a ra Nagg, paouez a ra trumm da c'hoarzhin*)

Nell Tu 'oa da welout er strad, da welout ar sont.

Hamm (*follet*) : N'eo ket echu ganeoc'h ! Ne echuoc'h biken ! (*En ur barrad fulor*) Hag-eñ ne echuo an dramañ biken ? (*Diwar wel e ya Nagg en e boubellen hag e serr ar golo warnañ e-unan. Nell ne fiñv ket.*)

(*Kounnaret-ruz*) Ma rouantelezh evit un dideiler ! (*C'hwitellat a ra. Clov a zeu tre*) Skarzh al lastez-mañ ! Taol kement-se er mor !

(*Mont a ra Clov war-du ar poubellennoù, chom a ra a-sav*)

Nell Ken gwenn.

Hamm Petra ? Diwar-benn petra 'mañ-hi o kontañ diota-choù ?

(*Stouiñ a ra Clov, kemer a ra dorn Nell evit santout lamm ar gwad*)

Nell (*ouzh Clov*) : An dezerzh !

(*Lezel a ra Clov he dorn da vont, bountañ a ra anezhi en-dro en he foubellen, hag a serr anezhi*)

Clov (*o tistreñ d'e blas e-kichen ar gador*) : He gwad ne lamm ket mui.

Hamm Petra 'oa o kontañ ?

Clov Lavaret he deus din mont kuit, en dezerzh.

Hamm Pebezh randonerezh ! Setu holl ?

Clov N'eo ket.

Hamm Petra c'hoazh ?

Clov N'em eus ket komprenet.

Hamm Boutailhet 'teus anezhi ?

Clov Hag em eus graet.

Hamm Boutailhet int o-daou ?

Clov Ya.

Hamm Stag ar biñsoù war ar poubellennoù. (*Mont a ra Clov war-zu ar poubellennoù*) Amzer 'zo. (*Chom a ra Clov a-sav*) Kouezhet eo ma fulor, c'hoant 'm eus d'ober titich.

Clov 'Maon o vont da gerc'hat ar voutailh da staotat.

(*Mont a ra war-zu an nor*)

Hamm Amzer 'zo. (*A-sav e chom Clov*) Ro din ma louzoù a-enep ar boan.

Clov Re abred eo. (*Ehan*) Re abred eo, n'eus ket pell a-walc'h eo bet roet dit da louzoù evit dihuniñ, al louzeier evit kousket n'o defe efed ebet.

Hamm Diouzh ar mintin e roer deoc'h louzoù da zihuniñ ho nervennoù, ha diouzh an noz louzoù d'o sioulaat. Nemet e vije ar c'hontrol. (*Ehan*) Ar medisin kozh, marv eo, evel just ?

Clov Ne oa ket kozh.

Hamm Met marv eo.

Clov Evel just. (*Ehan*) Te an hini a c'houlenn an dra-se diganin ? (*Ehan*)

Hamm Kas ac'hanon d'ober un droiadig. (*Mont a ra Clov a-dreñv ar gador hag e poulz anezhi*) Pas re vuan ! (*Bountañ a ra Clov war ar gador*) Raz ar mogiri, ha goude distro e-kreiz. (*Bountet 'vez ar gador gant Clov*). Just e-kreiz on bet, nann ?

Clov (*o poulzañ*) : Be' out bet.

Hamm Ezhomm 'zo da gaout ur gador war rodoù eus ar seurt mat. Gant rodoù bras. Rodoù marc'h-houarn. (*Ehan*) Raz ar voger 'maout ?

Clov (*o poulzañ*) : Hag emeon.

Hamm (*o tastornat da gavout ar voger*) : N'eo ket gwir ! Perak e kontez gevier din ?

Clov (*o tostaat ouzh ar voger*) : Setu ! Setu !

Hamm A-sav ! (*Lezel a ra Clov ar gador sko ouzh moger ar foñs*) Paour-kaezh kozh moger ! (*Ehan*) En tu all emañ an... Ifern all. (*Ehan. Feuls*) Tostoc'h ! Tostoc'h ! A-sko outi !

Clov Tenn da zorn (*Tennañ a ra Hamm e zorn. Kas a ra Clov ar gador sko ouzh ar voger*) Setu !

Stouiñ a ra Hamm war-zu ar voger, pegan a ra e skouarn outi.

Hamm Klevout 'rez ? (*Skeiñ a ra war ar voger gant e veilhoù-dorn*) Klevout a rez ? Brikennoù kleuz ! (*Skeiñ a ra adarre*) Kleuz eo tout ! (*Ehan. Sevel a ra e benn adarre. Feuls*) A-walc'h. Distroomp !

Clov N'hon eus ket graet an dro.

Hamm Distro d'am flas ! (*Da greiz eo kaset ar gador en-dro gant Clov*) Ma flas eo ?

Clov Ya, da blas eo.

Hamm Dres e-kreiz 'maon ?

Clov Muzuliañ 'maon o vont d'ober.

Hamm War-bouez nebeut ! War-bouez nebeut !

Clov (*o fiñval ar gador un disterig*) : Setu !

Hamm E-kreiz 'maon war-bouez nebeut ?

Clov Me 'gav din.

Hamm A gav dit ! Laka ac'hanon just e-kreiz.

Clov Me 'zo o vont da glask ar mestr da vuzuliañ.

Hamm War-bouez nebeut ! War-bouez nebeut ! (*Fiñval a ra Clov ar gador un disterig*) Dres e-kreiz.

Clov Setu.

(Ehan)

Hamm Soñjal a ra din emañ un tammig re war an tu kleiz. (*Fiñval a ra Clov ar gador un disterig*) Bremañ en em santan un disterig re war an tu dehou. (*Fiñval a ra Clov ar gador un disterig*) Un tammig re war an a-raok en em gavan. (*Fiñval a ra Clov ar gador un disterig*). Bremañ en em gavan un tammig re war an a-dreñv. (*Fiñval a ra Clov ar gador un disterig*). Arabat dit chom aze a-dreñv ar gador. Spontet on pa 'maout aze.

Dont a ra Clov en-dro en e blas, e-kichen ar gador.

Clov Ma c'hellfen lazhañ anezhañ, e varvfen eürus.

(Ehan)

Hamm Penaos 'mañ an amzer ?

Clov Evel boaz.

Hamm Sell ouzh an douar.

Clov Sellet 'm eus.

Hamm Gant al lunedenn ?

Clov Ezhomm ebet eus al lunedenn.

Hamm Sell outañ gant al lunedenn.

Clov Me 'zo o vont da gerc'hat anezhi.

Mont a ra Clov er-maez.

Hamm Ezhomm ebet eus al lunedenn !

Dont a ra Clov tre gant ar pellseller.

Clov Amañ 'maon, al lunedenn ganin. (*Mont a ra d'ar prenestr dehou, hag e sav e benn war-zu ennañ*) Ret eo din kaout ur skeul.

Hamm Perak ? Bihanoc'h out deut da vezañ ? (*Mont a ra Clov er-maez gant al lunedenn*) Ne blij ket din an dra-se, ne blij ket din an dra-se.

Dont a ra Clov tre gant ar skeul, met hep al lunedenn.

Clov Deut on en-dro gant ar skeul. (*Lakaat 'ra ar skeul dindan ar prenestr dehou, pignat a ra, merzout a ra n'emañ ket al lunedenn gantañ, diskenn a ra*) Ezhomm 'm eus eus ar pellseller.

Mont a ra betek an nor.

Hamm (*feuls*) : Met ganit 'mañ al lunedenn !

Clov (*o chom a-sav, feuls*) : Nann, n'emañ ket al lunedenn ganin !

Mont a ra Clov er-maez.

Hamm Lazhus eo an dra-se.

Dont a ra Clov tre gant al lunedenn. Mont a ra war-zu ar skeul.

Clov Muioc'h a vuhez 'zo bremañ gant an traoù ! (*Pignat 'ra gant ar skeul, sevel a ra al lunedenn, hag e lez anezhi da gouezhañ*) A-ratozh 'm eus graet. (*Diskenn a ra, dastum a ra al lunedenn hag e tro anezhi war-zu ar sal*) Gwelout a ran... un engroez-tud... o tarzhañ... gant al levez. (*Ehan*) Setu pezh a c'heller envel ul lunedenn-greskiñ. (*Izelaat 'ra ar pellseller hag e tro war-zu Hamm*) Ma, ne c'hoarzhomp ket ?

Hamm (*goude prederiañ*) : Nann, ne c'hoarzhan ket.

Clov (*goude prederiañ*) : Na me kennebeut. (*Pignat a ra gant ar skeul hag e tro ar pellseller war-zu an diavaez*) Tao-lomp ur sell. (*Sellout a ra, o fiñval ar pellseller*) Mann ebet... (*Sellout a ra*) Mann ebet. (*Sellout a ra*) ... Ha mann ebet.

Hamm Netra ne fiñv. Pep tra 'zo...

Clov Mann...

Hamm (*feuls*) : Gortoz 'vije komzet dit ! (*Mouezh reizh*) Pep tra 'zo... pep tra 'zo... pep tra 'zo petra ? (*Feuls*) Pep tra 'zo petra ?

Clov Petra eo pep tra ? En ur ger ? Setu petra 'fell dit gouzout ? Gortoz ur vunutenn. (*Treiñ a ra ar pellseller war an netra, sellout a ra, stouiñ al lunedenn ha treiñ war-zu Hamm*) Liv ar marv. (*Ehan*) Ma ? Laouen ?

Hamm Sell ouzh ar mor.

Clov Heñvel eo.

Hamm Sell ouzh ar mor bras !

Diskenn a ra Clov, ober un nebeut kammedoù war-zu ar prenestr kleiz, distreiñ evit kemer ar skeul, dougen a ra anezhi evit he lakaat dindan ar prenestr kleiz, pignat warni, treiñ ar pellseller war-zu an netra, ha sellout e-pad pell. Diskouez a ra bezañ souezhet, stouiñ a ra al lunedenn, sellout a ra pizh outi ha treiñ anezhi en-dro war-zu an netra.

Clov Morse n'em eus gwelet ur seurt tra !

Hamm (*enkrezet*) : Petra ? Ur ouel ? Stuc'henn ur pesk bras ? Moged ?

Clov (*o sellout*) : Izel eo aet goulou an heol.

Hamm (*sioulaet*) : Ma ! An holl a oar an dra-se.

Clov (*o sellout*) : Un tamm anezhañ a chome c'hoazh war wel.

Hamm An diazez.

Clov (*o sellout*) : Ya.

Hamm Ha bremañ ?

Clov (*o sellout*) : Aet eo tout.

Hamm Skrev ebet ?

Clov (*o sellout*) : Skreved !

Hamm Hag an dremmwel ? Netra war an dremmwel ?

Clov (*o stouiñ ar pellseller, o treiñ war-zu Hamm, fuloret*) : Petra en anv Doue 'c'hellfe bezañ war an dremmwel ?

(*Ehan*)

Hamm Ar gwagennoù, peseurt tres 'zo war ar gwagennoù ?

Clov Ar gwagennoù ? (*Treiñ a ra ar pellseller war-zu ar gwagennoù*) Plom.

Hamm Hag an heol ?

Clov (*o sellout*) : Mann ebet.

Hamm Met e tlefe bezañ o vont da guzh er mor. Sell adarre.

Clov (*o sellout*) : Da sutal gant an heol.

Hamm Noz eo dija, neuze ?

Clov (*o sellout*) : N'eo ket.

Hamm Neuze, petra eo ?

Clov (*o sellout*) : Gris (*Stouiñ a ra ar pellseller, hag o treiñ war-zu Hamm, kreñvoc'h*) Gris. (*Ehan. Kreñvoc'h c'hoazh*) GRRIS !

Ehan. Diskenn a ra, tostaat ouzh Hamm dre a-dreñv, hag e komz a vouezh izel en e skouarn.

Hamm (*sebezet, o tridal*) : Gris ! Ha klevet 'm eus ac'hanout o lavarout gris ?

Clov Du-sklaer. Eus ur penn-ahel d'egile.

Hamm Amplik ez ez ganti ! (*Ehan*) Arabat dit chom aze, spontet e vezan p'emaout aze !

Dont a ra Clov en-dro d'e blas, e-kichen ar gador.

Clov Perak ar farsadenn-mañ, devezh goude devezh ?

Hamm Ar boaz. Ne ouzer morse. (*Ehan*) An noz tremenet,

em eus gallet gwelout e diabarzh ma feultrin. Bez' e oa ur pezh koeñvadenn ennañ.

Clov Po ! Gwelet 'teus da galon.

Hamm Nann, bev oa an dra. (*Ehan. Enkrezet*) Clov !

Clov Ya.

Hamm Petra 'c'hoarvez ?

Clov Un dra bennak a zo o c'hoarvezout.

(*Ehan*)

Hamm Clov !

Clov (*hegaset*) : Petra 'zo ?

Hamm N'omp ket krog da... da... gaout un dalvoudegezh bennak ?

Clov Un dalvoudegezh bennak ! Te ha me, talvezout un dra bennak ! (*C'hoarzh berr*) Setu ur farsadenn gaer, avat !

Hamm 'N em c'houlenn a ran. (*Ehan*) Lakaomp e teufe en-dro war an douar un den dezhañ poell, hag-eñ ne zeufe ket da gaout menozioù diwar hor penn ma sellfe ouzhomp e-pad pellik a-walc'h... (*Dezhañ ton-mouezh un den poellek*) A, mat, gwelout a ran petra eo bremañ, ya, kompren a ran gant petra emaint bremañ. (*Ul lamm a ra Clov, lezel al lunedenn da gouezhañ, hag e peg da skrabañ e gof gant e zaou zorn. Ton-mouezh ordinal*) Hag hep mont keit-se ni hon-unan... (*Fromet*) ... ni hon-unan... mareoù 'zo. (*Feuls*) Soñjal n'eo ket kement-se marteze evit netra !

Clov (*enkrezet, o skrabañ*) : C'hwen a zo peg ennon !

Hamm C'hwen ! Be'z eus c'hwen c'hoazh ?

Clov Warnon, 'z eus unan atav de. (*O skrabañ*) Nemet e vefe ul laouenn-faraon.

Hamm (*chalet-bras*) : Met diouti e c'hellfe ar bed adsevel penn-da-benn, Pak anezhi en anv Doue !

Clov Me 'zo o vont da gerc'hat ar poultr.

Mont a ra Clov er-maez.

Hamm Ur c'hwenenn ! Spontus eo ! Pebezh devezh !

Dont a ra Clov en-dro gant ur voest da boultrennañ.

Clov Setu, deut on gant al louzoù.

Hamm Taol poultr warni 'ta !

Distardañ a ra Clov al laez eus e vragoù, sachañ a ra anezho un tammig war an a-raok, hag e taol poultr en digor. Stouiñ 'ra, sellout, gortoz, hag evel unan foll, e taol poultr adarre, stouiñ, sellout ha gortoz.

Clov Loen milliget !

Hamm Be' 'teus bet anezhi ?

Clov War a seblant. (*Lezel a ra ar voest-poultr da gouezhañ ha stardañ 'ra e vragoù en-dro*) Nemet e ve o tozviñ marv-bihan.

Hamm O tozviñ ! Lavaret 'vez : o c'hoari. Nemet e vefe o c'hoari marv-bihan.

Clov A ! Lavaret 'vez o c'hoari ? Ne vez ket lavaret o tozviñ marv-bihan ?

Hamm Un tamm spered 'teus, pe na 'teus ket ? Ma vije bet o

tozviñ, e vefemp holl foeltret !

Clov A ! (*Ehan*) Hag an titich ?

Hamm Setu pezh a ran.

Clov A, setu penaos 'ranker ober, setu penaos 'ranker ober !

(Ehan)

Hamm (*gant nerzh*) : Skarzhomp kuit, an daou ac'hanomp ! D'ar su ! Tu 'zo da sevel ur radell, ha gant red an dour e vimp kaset pell, pell-tre, davet... bronneged all.

Clov Doue ra viro !

Hamm Ma-unan, mont a rin va-unan war ar radell ! Kae da sevel ar radell-se diouzhtu. Warc'hoazh e vin aet kuit da vat.

Clov (*o vont betek an nor. Mall bras warnañ*) : Raktal e krogan gant al labour.

Hamm Gortoz ! (*Chom a ra Clov a-sav*) Rinkined 'vo, a soñj dit ?

Clov Rinkined ? N'ouzon ket. Ma'z eus e vo.

Mont a ra war-zu an nor.

Hamm Gortoz. (*Chom a ra Clov a-sav*) N'eo ket poent din kemer ma louzoù a-enep ar boan ?

Clov (*feuls*) : Nann, n'eo ket poent.

Mont a ra Clov war-zu an nor.

Hamm Gortoz ! (*Chom a ra Clov a-sav*) Penaos emañ da

zaoulagad ?

Clov Fall.

Hamm Met gouest out da welout.

Clov Kement hag a fell din.

Hamm Penaos 'mañ da zivesker ?

Clov Fall.

Hamm Met gouest out da vale.

Clov Mont... ha dont a ran.

Hamm Em zi. (*Ehan. Gant plijadur an diouganerezh*) Un deiz, e vi dall, eveldon. Amañ 'vi azezet, un dakennig en netra, en deñvalijenn, evit atav, eveldon. (*Ehan*) Un deiz, e lavari-te da-unan, skuizh on, me 'zo o vont d'azezañ, hag azezañ a ri. Neuze e lavari, naon am eus, 'maon o vont da sevel ha da zebriñ un tamm. Met ne savi ket. Lavarout a ri, n'em bije ket dleet azezañ met peogwir em eus graet, 'maon o vont da chom azezet un tammig c'hoazh, goude e savin evit debriñ un draig bennak. Met ne savi ket ha ne zebri netra. (*Ehan*) Sellout a ri ur pennadig ouzh ar voger, neuze e soñji, me 'zo o vont da serriñ ma daoulagad, marteze da gousket un tamm, goude-se 'n em santin gwelloc'h, hag e serri da zaoulagad. Ha pa zigori anezho en-dro, ne vo mui moger ebet ken. (*Ehan*) Un netra divent 'vo en-dro dit, holl ar re varv dasorc'het en holl amzerioù ne vefent ket evit leuniañ anezhañ, hag aze 'vi 'vel un tamm maen-krag a-netra kollet e-kreiz ar geoteg-veur. (*Ehan*) Ya, un deiz, goût a rit petra eo, eveldon e vi, nemet n'az to den ebet ganit, peogwir n'az to bet truez ouzh den all ebet, ha peogwir ne chomo den all ebet evit kaout truez ouzhit.

(*Ehan*)

Clov N'eo ket sur. (*Ehan*) Hag un dra 'zo a zisoñjez.

Hamm A !

Clov N'hellan ket azezañ.

Hamm (*taer*) : Ma, gourvez a ri, petra an diaoul a vern ! Pe e chomi difiñv en da sav, setu holl, chom a ri difiñv, en da sav, evel m'emaout bremañ. Un deiz e lavari, skuizh on, me 'zo o vont da chom a-sav. Petra 'vern e vefes en da sav pe ez kourvez ?

(*Ehan*)

Clov Neuze e fell deoc'h-holl ho tilezfenn.

Hamm Evel just.

Clov Ma, ho tilezel a rin.

Hamm N'hellez ket hon dilezel.

Clov Neuze n'ho tilezin ket.

(*Ehan*)

Hamm Perak ne beurlazhez ket ac'hanomp ? Reiñ a rin dit ar chifr da zigeriñ an armel-voued ma prometec din lazhañ ac'hanomp da vat.

Clov Ne c'hellfen ket ho peurlazhañ.

Hamm Neuze ne ri ket.

(*Ehan*)

Clov Me 'zo o vont, traoù 'm eus d'ober.

Hamm Soñj 'teus pa out deut amañ ?

Clov Nann, re vihan oan, 'teus lâret din.

Hamm Soñj 'teus eus da dad ?

Clov (*aet skuizh*) : Memes respont. (*Ehan*) Goulennet 'teus an traoù-se diganin milionoù ha milionoù a wechoù.

Hamm Plijout a ra din dreist ar goulennoù kozh. (*Entanet-holl*) A, ar goulennoù kozh, ar respontoù kozh, n'eus ket par dezho ! (*Ehan*) Me eo an hini 'zo bet tad dit.

Clov Ya. (*Paret e sell war Hamm*) Kement-se out bet evidon.

Hamm Ma zi, un ti evidout.

Clov Ya. (*Sellout 'ra en-dro dezhañ e-unan*) Kement-se eo bet an ti-mañ evidon.

Hamm (*lorc'h ennañ*) : Met evidon-me (*en em ziskouez a ra gant e zorn*) tad ebet. Met evit Hamm (*diskouez a ra gant e zorn an traoù en-dro dezhañ*) ti ebet.

(*Ehan*)

Clov Dilezel a rin ac'hanout.

Hamm Hag-eñ 'teus soñjet morse en un dra a zo ?

Clov Morse.

Hamm Hag-eñ 'teus soñjet emamp e foñs un toull amañ. (*Ehan*) Met en tu all d'ar menezioù ? Eñ ? Marteze eo glas c'hoazh ? Eñ ? (*Ehan*) Flora ! Pomona ! (*Es-maeet*) Ceres ! (*Ehan*) Marteze ne vo ket ret dit mont gwall bell !

Clov N'hellan ket mont gwall bell. (*Ehan*) Me 'zo 'vont.

Hamm Ha prest eo ma c'hi ?

Clov Un troad a vank dezhañ.

Hamm E seiz eo graet.

Clov Ur seurt ki Pomerania eo.

Hamm Kae da gerc'hat anezhañ.

Clov Un troad a vank dezhañ.

Hamm Kae da gerc'hat anezhañ. (*Mont a ra Clov er-maez*) Dont a raimp a-benn d'en em glevout.

Dont a ra Clov tre, o terc'hel dre unan eus e dri bav ur c'hi du c'hoariell.

Clov Setu da chas.

Reiñ a ra ar c'hi da Hamm, a flac'hot anezhañ, a flour anezhañ.

Hamm Gwenn eo, n'eo ket ?

Clov Tost.

Hamm Petra 'lavarez, tost, gwenn eo pe n'eo ket ?

Clov N'eo ket.

(*Ehan*)

Hamm Disoñjet 'teus ar pich.

Clov (*feuket*) : Met n'eo ket echu. Ar pich 'vez lakaet da ziwezhañ.

(Ehan)

Hamm "Teus ket lakaet e seizenn dezhañ.

Clov (*fuloret*) : Met n'eo ket echu, pa lavaran dit ! Da gentañ ez echuer ar c'hi ha neuze e lakaer dezhañ e seizenn.

(Ehan)

Hamm Gouest eo da chom en e sav ?

Clov N'ouzon ket.

Hamm Klask. (*Reiñ a ra ar c'hi da gClov, hag a lak anezhañ war al leur*) Neuze ?

Clov Gortoz !

Kluchañ 'ra, klask a ra lakaat ar c'hi da chom en e sav, war e dri bav, n'hell ket, lezel 'ra anezhañ da gosteziñ. Kouezhañ 'ra ar c'hi.

Hamm (*taer*) : Neuze ?

Clov En e sav emañ.

Hamm (*o klask a-dastorn*) : Pelec'h ? Pelec'h emañ ?

Derc'hel a ra Clov ar c'hi en e sav.

Clov Amañ.

Kemer a ra dorn Hamm hag e lak anezhañ war benn ar c'hi.

Hamm (*e zorn war benn ar c'hi*) : o sellout ouzhin emañ ?

Clov Ya.

Hamm (*lorc'h ennañ*) : Evel pa vije oc'h aspediñ ac'hanon da gas anezhañ da bourmen ?

Clov Ma fell dit.

Hamm (*evel a-raok*) : Pe evel pa vefe oc'h aspediñ ac'hanon da reiñ dezhañ un askorn ? (*Tennañ a ra e zorn*) Lez anezhañ evel-se, en e sav, oc'h aspediñ ac'hanon.

Mont a ra Clov en e sav. Kouezhañ 'ra ar c'hi war e gostez.

Clov Me 'zo 'vont.

Hamm Hag-eñ 'teus bet da weledigezhioù ?

Clov Nebeutoc'h.

Hamm War enaou emañ ar goulou e ti ar vamm Peg ?

Clov Goulou ! Penaos e c'hellfe bezañ ur goulou bennak war enaou ?

Hamm Marv eo !

Clov Evel just eo marv ! Ma n'eo ket war enaou, eo marv.

Hamm Nann, ar vamm Peg an hini eo a lavaran eo marv.

Clov Met evel just eo marv. (*Ehan*) Petra 'c'hoarvez ganit, hiziv ?

Hamm Gant red ma buhez ez an. (*Ehan*) Douaret eo bet ?

Clov Douaret ! Piv en dije douaret anezhi ?

Hamm Te.

Clov Me ! N'em eus ket a-walc'h d'ober hep mont da zouarañ tud ?

Hamm Dav-mat 'vo dit douarañ ac'hanon.

Clov Nann, ne rin ket.

(Ehan)

Hamm Koantik eo bet gwechall, evel ur vleunienn er prad.
(*Gant un taol-lagad lampon*) Hag unan dreist evit ar baotred !

Clov Ni ivez, omp bet koantik... gwechall... N'eus ket kalz tud ha n'int ket bet koantik... ur mare bennak.

(Ehan)

Hamm Kae da gerc'hat ar vazh-krog.

Mont a ra Clov betek an nor, hag e chom a-sav.

Clov Gra an dra-mañ, gra an dra-se, hag ober a ran. Morse ne nac'han. Perak ?

Hamm N'out ket evit nac'h.

Clov Hepdale ne rin ket.

Hamm Ne vi ket gouest ken. (*Mont a ra Clov*) A, an dud, an dud, ret eo displegañ pep tra dezho.

Dont a ra Clov gant ar vazh-krog.

Clov Setu da vazh-krog. Dalc'h anezhi sonn.

Reiñ a ra ar vazh-krog da Hamm, hag hemañ, oc'h ober ganti evel gant ur vazh da gas ur vag war-raok, a glask lakaat e gador da vont a-raok.

Hamm Fiñvet he deus ?

Clov N'he deus ket.

Teurel a ra Hamm ar vazh-krog kuit.

Hamm Kae da gerc'hat ar bidon-eoul.

Clov Evit petra ?

Hamm Evit eouliañ ar rodoù.

Clov Dec'h em eus eouliet anezho.

Hamm Dec'h ! Petra 'dalv an dra-se ? Dec'h !

Clov (*feuls*) : Petra a dalvez ? Dec'h e oa ar sakre devezh-se, pell 'zo ; a-raok ar sakre devezh-mañ. Implij a ran ar gerioù 'teus desket din. Ma n'o deus talvoudegezh ebet ken, desk din lod all. Pe neuze, ra davin !

(Ehan)

Hamm Anavezet 'm eus gwechall un den foll a soñje dezhañ e oa deut fin ar bed. Ul livour e oa... un engraver. Keneil bras oan dezhañ. Kustum oan da vont d'e welout, e ti ar re foll. E zorn a gemeren hag e sachen anezhañ betek ar prenestr. Sellit ! Aze ! An ed o sevel ! Hag aze ! Sellit ! Gouelioù ar bigi harinked ! Seurt kaerder ! (*Ehan*) Tenn a rae e zorn a daol-trumm hag ez ae en-dro d'e gorn. Sebezet. N'en doa gwelet netra nemet ludu. (*Ehan*) Ne oa chomet neme-tañ. (*Ehan*) Disoñjet. (*Ehan*) War a seblant seurt degouezh n'eo ket... ne oa ket... ken divoutin-se.

Clov Un den foll ? Pevare oa ?

Hamm O pell 'zo, pell 'zo, ne oas ket c'hoazh war zouar ar re vev.

Clov Doue da vennigo an devezhioù !

Ehan, Sevel a ra Hamm e voned.

Hamm Kalz e karen anezhañ. (*Ehan, Adlakaat a ra e voned.*)
Ul livour oa... hag un engraver.

Clov Bez' ez eus kement a draoù spontus.

Hamm Nann, nann, n'eus ket kement anezho bremañ.
(*Ehan*) Clov !

Clov Ya.

Hamm Ne soñj ket dit en deus kement-se padet pell a-
walc'h ?

Clov Eo ! (*Ehan*) Petra ?

Hamm An... an... dra-mañ.

Clov Atav eo bet ma soñj. (*Ehan*) Pas da hini ?

Hamm (*teñval*) : Neuze un devezh evel n'eus forzh peseurt
devezh all eo hemañ.

Clov Keit hag e pado. (*Ehan*) Ar vuhez-pad, an hevelep
sotonioù.

(*Ehan*)

Hamm N'hellan ket dilezel ac'hanout.

Clov Goût a ran. Ha n'out ket evit dont d'am heul.

(*Ehan*)

Hamm Ma tilezez ac'hanon, penaos e ouezin ?

Clov (*sart*) : Ma, c'hwitellat a ri... ha ma ne zeuan ket en ur
redek eo peogwir em bo dilezet ac'hanout.

(*Ehan*)

Hamm Ne zeui ket da lavarout kenavo ha da bokañ din.

Clov O ne soñj ket din.

(*Ehan*)

Hamm Met bez' e c'hellfes bezañ marv 'barzh da gegin, setu
holl.

Clov Heñvel 'vo evidout.

Hamm Ya, met penaos e ouezin ma 'vijes tra ken nemet marv
'barzh da gegin ?

Clov Ma... abred pe ziwezhat e krogin da flaeriañ.

Hamm Flaerius out dija. An ti a-bezh a zo gantañ flaer ar
c'horfoù marv.

Clov Ar bed a-bezh.

Hamm (*e fulor*) : Da sutal gant ar bed. (*Ehan*) Klask ur
menoz bennak.

Clov Petra ?

Hamm Ur menoz, kav ur menoz bennak ! (*E fulor*) Ur menoz
skedus.

Clov A mat ! (*Kregiñ a ra da vont ha da zont, paret e zaou-
lagad war al leur, e zaouzorn a-dreñv e gein. Chom a
ra a-sav*) Nag a boan em divesker ! N'eo ket da vezañ
kredet ! Hepdale ne vin ket mui evit prederiañ.

Hamm Ne vi ket gouest da zilezel ac'hanon. (*Pegiñ a ra Clov
en-dro da vale*) Petra 'maout oc'h ober ?

Clov O kaout ur menoz. (*Bale a ra*) A !

Chom a ra a-sav.

Hamm Pebezh spered ! (*Ehan*) Neuze ?

Clov Gortoz. (*Prederiañ a ra. N'eo ket sur-tre*) Ya !... (*Sevel a ra e benn*) Setu ! An dihunter : lakaet 'm eus anezhañ da seniñ.

Hamm Marteze n'eo ket unan eus ma devezhioù skedusañ, met e gwirionez...

Clov C'hwitellat a rez din da zont. Ne zeuan ket. Seniñ a ra an dihunter. Aet on kuit. Ne son ket. Marv on.

Hamm Mont a ra en-dro ? (*Ehan. Taer*) An dihunter ? Mont a ra en-dro ?

Clov Perak n'afe ket en-dro ?

Hamm Peogwir eo bet re implijet.

Clov Met a-boan m'eo bet implijet.

Hamm (*fuloret*) : Neuze peogwir eo bet re nebeut implijet.

Clov 'Maon o vont da welout. (*Mont a ra Clov. Klevout a reer, ur momedig, an dihunter o seniñ e lec'h all. Dont a ra Clov gantañ. Hen lakaat a ra e-kichen skouarn Hamm hag e lez anezhañ da seniñ. Selaou a reont outañ betek ar fin. Ehan*) Peadra da zihunañ ar re varv ! Klevet 'teus ?

Hamm A-boan.

Clov Er fin eo brav-dispar.

Hamm Bravoc'h e kavan an tamm kreiz. (*Ehan*) N'eo ket

poent din kemer ma louzoù a-enep ar boan ?

Clov Nann. (*Mont a ra betek an nor, treiñ a ra e gein*) 'Maon o vont.

Hamm Amzer ma istor eo. C'hoant 'teus da selaou ma istor.

Clov N'em eus ket.

Hamm Goulenn digant ma zad hag-eñ e fell dezhañ selaou ma istor.

Mont a ra Clov betek ar poubellennoù, sevel a ra ar golo diwar hini Nagg, stouiñ a ra, sellout a ra e-barzh. Ehan. Sevel a ra e gein.

Clov Kousket eo.

Hamm Dihun anezhañ.

Stouiñ a ra Clov, dihuiniñ a ra Nagg gant an dihunter. Gerioù digomprenus. Sevel a ra Clov e gein.

Clov Ne fell ket dezhañ selaou da istor.

Hamm Reiñ a rin ur madig dezhañ.

Stouiñ a ra Clov. Evel ar wech a-raok.

Clov C'hoant en deus da gaout ul lima.

Hamm Ul lima 'vo roet dezhañ.

Stouiñ a ra Clov. Evel ar wech a-raok.

Clov Ur marc'had eo. (*Mont a ra war-zu an nor. Gwelout a reer daouzorn Nagg o pegañ e bord ar poubellenn. E benn a zeu war wel neuze. Tizhout a ra Clov an nor, ha treiñ a ra e gein*) Ha krediñ a rez en ur vuhez da zont ?

Hamm Va hini n'eo nemet ur vuhez da zont. (*Mont a ra Clover-maez*) Paket eo bet ar wech-mañ !

Nagg Selaou a ran.

Hamm Mat da netra ! Perak 'teus graet ac'hanon ?

Nagg Ne ouien ket.

Hamm Petra ? Ne ouies ket ?

Nagg E vije bet te. (*Ehan*) Reiñ a ri din ul lima ?

Hamm Goude bezañ klevet an istor.

Nagg Touiñ a rez ?

Hamm Ya.

Nagg War betra ?

Hamm War va enor.

Ehan. C'hoarzhin a reont a galon vat.

Nagg Daou.

Hamm Unan.

Nagg Unan evidon hag unan evit...

Hamm Unan ! Peoc'h ! (*Ehan*) Pelec'h oan erru ? (*Ehan. Teñval e benn*) Echu eo, echu omp. (*Ehan*) Hogos echu. (*Ehan*) Ne vo prezegenn ebet ken. (*Ehan*) Un dra bennak a ziver diouzh ma empenn, diouzh melloù ma fenn. (*C'hoarzhadenn hanter vouget eus perzh Nagg*) Splach, splach, bepred en hevelep lec'h. (*Ehan*) Ur wazhienn-gas vihan. (*Ehan. Buhezekoc'h*) A-walc'h gant se, mare ma istor eo, pelec'h oan erru ? (*Ehan.*

Gant ton-mouezh un den o kontañ) An den a zeue a-ruz, davedon, a-stlej e gof. Morlivet, gwenn ha treut souezhus, e seblante tost da... (*Ehan. Mouezh reizh*) Nann, kontet 'm eus an tamm-se. (*Ehan. Mouezh un den o kontañ*) Sioul-kenañ e leunien ma fibenn... an hini eon, tanañ anezhi gant... lavaromp un alumetezenn Seita, hag e tennen un nebeut analadoù. Aaa ! (*Ehan*) Ma, petra 'peus c'hoant da gaout c'hwi ? (*Ehan*) Un devezh sklas-spontus e oa, soñj am eus, ar gwrezvuzulier o verkañ mann. Met peogwir e oa an deiz a-raok Nedeleg ne oa aze netra... souezhus. Amzer c'hoañv, evit ur wech, mui pe vui. (*Ehan*) Ma, peseurt avel foll he deus kaset ac'hanoc'h davedon ? Sevel a reas e fas war-zu ennon, du gant ar pri hag an daeroù mesk-ha-mesk. (*Ehan. Mouezh ordinal*) Trawalc'h e-giz-se. (*Mouezh an hini o kontañ*) Nann, nann, na sellit ket ouzhin, na sellit ket ouzhin. Stouiñ a reas e sell hag e c'hrozmolaz un dra bennak, digareziou, a soñj din. (*Ehan*) Kalz labour am eus, c'hwi oar, an taol diwezhañ, a-raok an devezhioù gouel, gouzout a rit petra eo. (*Ehan. Dre ret*) Lavarit din, perak oc'h deut amañ da aloubiñ ma zi ? (*Ehan*) Un devezh kaer-skedus e oa, soñj am eus, hanter-kant gant an heolvuzulier, met dija e oa an heol o vont da guzh en... e-mesk ar re varv. (*Mouezh ordinal*) Kaset brav, an dra-se. (*Mouezh an hini o kontañ*) Ma, lavarit din 'ta, lavarit din petra 'maoc'h o c'houlenn ha lezit ac'hanon da adkregiñ gant ma labourioù. (*Ehan. Mouezh ordinal*) Setu aze un doare kaer da lavarout an traoù. A, mat... (*Mouezh an hini o kontañ*) D'ar poent-se e reas e soñj da gomz. Ma bugelig an hini eo, emezañ. Tsss, tsss, ur bugelig, n'eo ket mat. Ma faotrig an hini eo, evel pa vije pouezus gouzout ha paotr pe blac'h e oa. Eus pelec'h oa o tont. Reiñ a reas din anv an toull. Un hanter zvezh hent war varc'h da nebeutañ. Petra 'maoc'h o klask reiñ da grediñ ? Ez eus c'hoazh tud o chom en toullig-se ?... Nann, nann, pas un ene, eñ hepken hag ar bugelig... mar deo gwir e oa ur bugelig. Mat. Goulennet 'm eus

penaos e oa an traoù e Kov, en tu all d'ar pleg-mor. 'Oa ket ur c'hristen ! Mat. Hag e c'hortozit ac'hanon da grediñ ho peus lezet hoc'h hini bihan du-se, e-unan-penn, ha bev war ar marc'had ? Anzavit 'ta. (Ehan) Un devezh barr-amzer e oa, soñj am eus, kant gant an avelvuzulier. Diskar a rae an avel ar gwez sapin sec'h hag e skube anezho pell... war-du ar maezioù. (Ehan. Mouezh ordinal) Un disterig gwan, an dra-mañ. (Mouezh un den o kontañ) Ale, paotr, lavarit sklaer ho soñj, petra 'c'hortozit diganin, ret eo din prientiñ ar gwez kelenn. (Ehan) Ma, evit berraat, a-benn ar fin e voe komprenet e c'houlenne diganin... bara evit ar bidoc'hig. Bara ? Met n'em bez tamm bara, bara n'eo ket mat evidon. Neuze, Marteze un tammig maiz ? (Ehan. Mouezh ordinal) Evel-se e tlefe bezañ mat a-walc'h an istor. (Mouezh an hini o kontañ) Maiz, ya, maiz am eus, gwir eo, em grignol. Met soñjit mat. Reiñ a ran deoc'h un tammig maiz, ul lur, ul lur hanter, kas a rit anezhañ d'ho pugel hag e fardit dezhañ... ma'z eo bev c'hoazh... ur podad yod (ul lamm a ra Nagg) ur brav a bodadig hanter porridge, boued magus ma'z eus. Mat. Dont a ra e ziv-jod bihan da vezañ livet brav adarre... marteze. Ha neuze ? (Ehan) Kollet 'm eus ma fasanted. (Feuls) Soñjit un tammig, war an douar emaoe'h, n'eus netra d'ober a-enep an dra-se. (Ehan) Un devezh sec'h-kenañ e oa, soñj 'm eus, mann ebet gant ar gleborvuzulier. Amzer dispar, evit va remm. (Ehan. Feuls) Met en anv Doue, petra 'maoc'h o soñjal ? E tasorc'ho ar bed en nevez-hañv. Pesked o neuñv er stêrioù hag er mor ? E kouezho c'hoazh boued eus an Neñv evit genaouerien evel doc'h ? (Ehan) Sioulaat a raen goustadik, a-walc'h d'an nebeutañ evit goulenn digantañ pegeit e oa bet gant e hent, o tont betek amañ. Tri devezh leun. Mat. E peseurt stad en doa lezet ar bugel. Kousket don. (Gant nerzh). Ya, met peseurt doare kousket, peseurt doare kousket e oa aet don ennañ dija. (Ehan) Mat, evit berraat em boa profet dezhañ kemer anezhañ em servij. Fromet en doa din

ma c'halon. Ha neuze, dija e soñjen na oan ket mui evit chom pell er bed-mañ. (C'hoarzhin a ra) Ma ? (Ehan) Ma ? Amañ, ma taolfec'h evezh, e c'hellfec'h mervel gant ur marv naturel ha dous, er peoc'h hag en tommder. (Ehan) A-benn ar fin e c'houlennas diganin hag-eñ ez asantfen kemer ar bugelig ivez... ma vije bev c'hoazh. (Ehan) An dra-se oan bet o c'hortoz. (Ehan) Gwelout a ran anezhañ c'hoazh, daoulinet, e zaou-zorn a-blat war al leur, e zaoulagad o sellout foll ouzhin, hag eñ savet a-enep d'ar pezh a felle din. (Ehan. Mouezh reizh) Hepdale em bo echu gant an istor-se. (Ehan) Nemet e tegasfen tud all e-barzh ar c'hoari. (Ehan) Met, pelec'h e kavfen anezho ? (Ehan) E pelec'h ez afen da gerc'hat anezho ? (Ehan. C'hwitellat a ra. Dont a ra Clov tre) Pedomp Doue.

Nagg Ha ma limig !

Clov Bez' ez eus ur razhedenn er gegin !

Hamm Ur razhedenn ! Razhed 'zo c'hoazh ?

Clov Er gegin ez eus unan.

Hamm Ha ne 'teus ket lazhet anezhi ?

Clov Hanter. Direnket 'teus ac'hanomp.

Hamm N'hell ket skarzhañ kuit ?

Clov Nann.

Hamm Lazhañ 'ri anezhi diwezhatoc'h. Pedomp Doue !

Clov Adarre !

Nagg Ha ma limig !

Hamm Doue da gentañ ! (Ehan) Prest out ?

Clov (*dav dezhañ sentiñ*) : Dav dezhi neuze.

Hamm (*ouzh Nagg*) : Ha te ?

Nagg (*o stardañ e zaouzorn, e zaoulagad serret, o ragachat*) :
Hon Tad, pehini a zo...

Hamm Peoc'h ! E peoc'h ! E pelec'h out bet savet ? (*Ehan*)
Krogomp !

(*Emzalc'h tud o pediñ. Dilavar. O kemm emzalc'h,
digalonekaet*)

Hamm Neuze ?

Clov (*o kemm emzalc'h*) : Peseurt spi ! Ha te ?

Hamm Tri mil mallozh Doue ! (*Ouzh Nagg*) Ha te ?

Nagg Gortoz ! (*Ehan, O kemm emzalc'h*) Netra d'ober !

Hamm Ar pezh fall ! N'eus ket anezhañ !

Clov Pas c'hoazh.

Nagg Ma limig !

Hamm N'eus ket mui madig ebet !

(*Ehan*)

Nagg Reizh eo. Goude holl, da dad on. Gwir eo, ma ne vije ket bet me, 'vije bet unan all. Met n'eo ket un digarez. (*Ehan*) Madigoù Crema, da skouer, ha n'eus ket mui anezho, gouzout a reomp holl, n'eus netra er bed a garan kemend-all. Hag un devezh bennak, e c'houlennin lod diganit, e-giz trugarez evit un dra jentil em bo graet hag e prometi din. Ret mat eo bevañ gant e amzer. (*Ehan*) Piv 'oas kustum da c'hervel pa oas

bugelig, o krenañ gant ar spont en deñvalijenn ? Da vamm ? Nann. Me. Lezet e oas da leñvañ. Neuze e vezes kaset d'ul lec'h na oas ket klevet, evit ma c'hellfemp kousket e peoc'h. (*Ehan*) Kousket oan, ken eñrus hag ur roue, ha te a zihune ac'hanon evit ober din selaou ouzhit. Ne oa ket ret, n'az toa ket ezhomm e gwirionez da gaout ac'hanon da selaou ouzhit. Ouzhpenn-se ñe selaouen ket. (*Ehan*) Spi am eus e teuo an deiz ma'z to gwir ezhomm da gaout ac'hanon da selaou ouzhit, ma'z to gwir ezhomm da glevout ma mouezh, n'eus forzh peseurt mouezh. (*Ehan*) Ya, spi am eus e vevin pell a-walc'h da welout an dra-se, da glevout ac'hanout o c'hervel ac'hanon evel oas kustum d'ober, pa oas bugelig spontet en deñvalijenn, ha pa oan-me da spi nemetañ. (*Ehan. Skeiñ a ra Nagg war golo poubellenn Nell. Ehan. Nell ! (Ehan. Kreñvoc'h e sko. Ehan) (Kreñvoc'h c'hoazh) Nell !*

(*Ehan*)

Nagg a ziskenn en e boubellenn, a serr ar golo warnañ e-unan. Ehan.

Hamm Echu eo bremañ evidomp ar plijadurezhioù. (*Tastornañ a ra o klask ar c'hi*) Aet eo ar c'hi kuit.

Clov N'eo ket ur c'hi gwirion, n'hell ket mont kuit.

Hamm (*o tastornañ*) : N'emañ ket amañ.

Clov Gourvezet eo.

Hamm Ro din anezhañ ! (*Kemer a ra Clov ar c'hi hag e ro anezhañ da Hamm. Derc'hel a ra Hamm anezhañ en e zivrec'h. Kuit e taol Hamm ar c'hi*) Loen brein ! (*Kregiñ a ra Clov da zastum an traoù strewet war al leur*) Petra 'rez ?

Clov Lakaat urzh. (*Sevel a ra e gein. Gant kalon*) Me 'zo o vont da lakaat pep tra en urzh.

Pegin 'ra adarre da zastum an traoù.

Hamm Urzh !

Clov (*o sevel e gein*) : Karout a ran an urzh, Ma huñvre eo. Ur bed 'lec'h 'vije didrouz ha sioul pep tra, 'lec'h 'vije pep tra en e blas diwezhañ, goloet gant ar bouldrenn diwezhañ.

Pegin a ra adarre da zastum an traoù.

Hamm (*follet*) : En anv Doue, petra 'soñj dit emañ oc'h ober ?

Clov (*o sevel e gein*) : Va gwellañ a ran evit lakaat un tammig urzh.

Hamm Lez da gouezhañ !

Lezel a ra Clov an traoù en doa dastumet da gouezhañ.

Clov Goude holl, amañ pe e lec'h all.

Mont a ra war-zu an nor.

Hamm (*kounnaret*) : Petra 'zo a-dreuz gant da dreid ?

Clov Gant ma zreid ?

Hamm Ha klik ha klak, ha klik ha klak ?

Clov 'Michañs em eus lakaet ma botoù-kinoù.

Hamm Poan 'toa gant da chaosonoù ?

(Ehan)

Clov Me 'zo o vont ?

Hamm N'i ket !

Clov Petra 'zo amañ da zerc'hel ac'hanon ?

Hamm An tammig kaozeadenn ganin. (*Ehan*) War-raok on aet gant ma istor. (*Ehan*) Brav on aet war-raok gantañ. (*Ehan. Kounnaret*) Goul' ganin pelec'h on erru !

Clov O, ya, pa soñjan, ha da istor ?

Hamm (*souezhet*) : Peseurt istor ?

Clov An hini out bet o kontañ dit da-unan... devezhioù-pad.

Hamm A, ma danevell, 'fell dit lâroul ?

Clov Setu dres.

(Ehan)

Hamm (*kounnaret*) : Kendalc'h 'ta, n'out ket evit kenderc'hel !

Clov Aet eo war-raok, spi am eus.

Hamm (*gant elevez vras*) : O pas gwall bell, pas gwall bell. (*Huanadiñ a ra*) Devezhioù 'zo evel-se, n'en deus an den ijin ebet. (*Ehan*) Ha n'eus netra d'ober, ret eo gortoz e teufe an ijin deoc'h en-dro. (*Ehan*) Arabat mont dre nerzh, arabat mont dre heg, eeun e rank dont. (*Ehan*) Met memes tra, aet on un tamm war-raok. (*Ehan*) Un afer a vicher, te oar. (*Ehan. Gant fulor*) Lavarout a ran on aet un tamm war-raok memes tra.

Clov (*estlammet*) : Iche, n'eo ket posupl ! Daoust d'an holl

draoù all out bet gouest da vont war-raok gantañ !

Hamm (*gant elevez*) : O pas gwall bell, te oar, pas gwall bell, met memes tra gwelloc'h eget netra.

Clov Gwelloc'h eget netra ! Ha gwir e vefe ?

Hamm Me 'zo o vont da gontañ dit penaos e tremen an traoù. Dont a ra a-ruz e gof...

Clov Piv ?

Hamm Petra ?

Clov Piv a zeu a-ruz e gof ?

Hamm Piv a zeu ! Un all c'hoazh.

Clov A, hennezh ! 'Oan ket re sur.

Hamm A-ruz e gof oc'h aspediñ e rofen bara dezhañ evit e grouadur. Kinnig a ran dezhañ ur plas liorzhour. A-raok... (*Tarzhañ a ra Clov da c'hoarzhin*) Petra 'zo ken fentus gant an dra-se ?

Clov Ur plas liorzhour !

Hamm An dra-se eo a ra dit c'hoarzhin ?

Clov An dra-se eo sur a-walc'h.

Hamm Ne vefe ket an tamm bara ?

Clov Pe ar c'hrouadur.

(*Ehan*)

Hamm Peadra 'zo da c'hoarzhin, gwir eo. Ha m'en em lak-femp da c'hoarzhin a-greiz hor c'halon hon-daou a-gevret ?

Clov (*goude prederiañ*) : Ne c'hellfen ket c'hoarzhin ur wech all hiziv.

Hamm (*goude prederiañ*) : Na me kennebeut. (*Ehan*) Kendalc'h a ran neuze. A-raok respont ya ha trugarekaat, e c'houlenn diganin hag-eñ e c'hellfe degas e baotrig bihan gantañ.

Clov Pe oad ?

Hamm O, bihan tout.

Clov Krimpet en dije ouzh ar gwez.

Hamm An holl dammoùigoù labourioù 'vez d'ober.

Clov Ha neuze e vije kresket.

Hamm Sur a-walc'h.

(*Ehan*)

Clov Dalc'h da gontañ 'ta, mar plij, dalc'h da gontañ !

Hamm Setu tout. Echu 'm eus aze.

(*Ehan*)

Clov Gwelout a rez penaos e kendalc'h ?

Hamm Mui pe vui.

Clov Echu 'vo 'benn nebeut ?

Hamm Aon 'm eus e vo.

Clov Ba ! Unan all a savi.

Hamm N'ouzon ket. (*Ehan*) Aet eo ma ijin da hesk, 'm eus

aon. (*Ehan*) Re hir em eus poaniet da ijinañ traoù.
(*Ehan*) Ma c'hellfen 'n em stlejañ betek an aod ! Ober
a rafen ur goubenner traezh evit ma fenn hag e teufe
al lanv.

Clov N'eus ket a lanvioù ken.

(*Ehan*)

Hamm Kae da welout ha marv eo-hi pe get.

*Mont a ra Clov d'ar poubellennoù, sevel a ra ar golo
diwar hini Nell. Stouiñ a ra ha sellout e-barzh.*

(*Ehan*)

Clov An tres he deus.

*Serriñ a ra ar boubellenn, sevel e gein. Tennañ a ra
Hamm e voned. Ehan. Lakaat a ra anezhañ en-dro
war e benn.*

Hamm (*e zorn war e voned*) : Ha Nagg ?

*Sevel a ra Clov ar golo diwar poubellenn Nagg, stouiñ
a ra ha sellout e-barzh. Ehan.*

Clov N'en deus ket an tres da vezañ.

Serriñ a ra ar boubellenn, sevel a ra e gein.

Hamm (*o tennañ e zorn diwar e voned*) : Petra 'ra ?

*Sevel a ra Clov ar golo diwar poubellenn Nagg, stouiñ
a ra ha sellout e-barzh.*

Ehan.

Clov Leñvañ 'ra.

Serriñ a ra ar boubellenn, sevel e gein.

Hamm Bev eo neuze. (*Ehan*) Ha c'hoarvezet eo din bezañ
eürus ur wech bennak ?

Clov Ne soñj ket din.

(*Ehan*)

Hamm Kas ac'hanon dindan ar prenestr. (*Mont a ra Clov war-
zu ar gador*) C'hoant 'm eus da santout ar goulou war
va fas. (*Poulzañ a ra Clov ar gador*) Soñj 'teus, er penn
kentañ, pa gases ac'hanon d'ober an dro ? Kustum oas
da zerc'hel da zaouzorn re uhel war ar gador. Bep eil
paz oas tost da deurel ac'hanon d'an traoñ. (*O tas-
krenañ evel un den kozh*) Nag hon eus c'hoarzhet, nag
hon eus c'hoarzhet, an daou ac'hanomp ! (*Teñval*) Ha
neuze, omp deut da gustumiñ. (*Harpañ a ra Clov ar
gador dindan ar prenestr dehou*) Erruet dija ? (*Ehan*).
Kas a ra e benn en a-dreñv) Sklaer eo ?

Clov N'eo ket teñval.

Hamm (*fuloret*) : Goulenn a ran ha sklaer eo pe n'eo ket ?

Clov Sklaer eo.

(*Ehan*)

Hamm N'eo ket tennet ar ridoch ?

Clov Nann.

Hamm Peseurt prenestr eo ?

Clov Prenestr an douar.

Hamm Goût a raen ! (*Fuloret*) Met n'eus sklerijenn ebet o
tont aze ! An hini all ! (*Kas a ra Clov ar gador dindan*

ar prenestr kleiz. Sevel a ra Hamm e benn) Setu ar pezh a anvan goulou ! (*Ehan*) Lavaret 'vije ur bann-heol o kouezhañ warnon. (*Ehan*) 'Vije ket ?

Clov Nann.

Hamm N'eo ket ur bann-heol a santan war va fas ?

Clov Nann.

Hamm Gwenn-tre ez on ? (*Ehan. Fuloret*) Goulenn a ran hag-eñ on gwenn-tre.

Clov N'out ket gwennoc'h eget boas.

(*Ehan*)

Hamm Digor ar prenestr !

Clov Evit petra ?

Hamm C'hoant 'm eus da glevout ar mor.

Clov Ne glevi ket anezhañ.

Hamm Zoken ma tigorez ar prenestr ?

Clov Zoken ma ran.

Hamm Neuze ne dalvez ket ar boan digeriñ ar prenestr ?

Clov Nann.

Hamm (*taer*) : Neuze digor anezhañ ! (*Sevel a ra Clov gant ar skeul, ha digeriñ ar prenestr. Ehan*) Digor eo ?

Clov Ya.

(*Ehan*)

Hamm Touiñ a rez 'teus digoret anezhañ ?

Clov Ya.

(*Ehan*)

Hamm Neuze... ! (*Ehan*) E tle bezañ sioul-tre. (*Ehan. Fuloret*) Goulenn a ran ha sioul eo pep tra ?

Clov Ya.

Hamm Peogwir n'eus ket martolod ebet ken. (*Ehan*) 'Teus ket kalz tra da gontañ a-greiz-holl. Mat 'mañ an traoù ?

Clov Riv 'm eus.

Hamm Peseurt miz eo ? (*Ehan*) Serr ar prenestr, distreiñ a reomp. (*Serriñ a ra Clov ar prenestr, diskenn a ra, kas ar gador en-dro en he flas, ha chom en e sav a-dreñv dezhi, stouet e benn*) 'Chom ket aze, spontañ 'rez ac'hanon pa 'maout aze ! (*Mont a ra Clov en-dro e-kichen ar gador*) Tad ! (*Ehan. Kreñvoc'h*) Tad ! (*Ehan*) Kae da welout hag-eñ e klev ac'hanon.

Mont a ra Clov da boubellenn Nagg, sevel ar golo, stouiñ. Gerioù digomprenus. Sevel a ra Clov e gein.

Clov Ya.

Hamm An div wech am eus galvet ?

Stouiñ a ra Clov. Evel ar wech a-raok.

Clov Ur wech hepken.

Hamm Ar wech kentañ pe an eil ?

Stouiñ a ra Clov. Evel a-raok.

Clov Ne oar ket.

Hamm An eil gwech e tle bezañ.

Clov Morse ne ouiimp.

Serrin 'ra ar golo.

Hamm O leñvañ 'mañ bepred ?

Clov N'emañ ket.

Hamm Buan e ya ar re varv. *(Ehan)* Petra 'ra ?

Clov Sunañ e wastell.

Hamm Kenderc'hel a ra ar vuhez. *(Mont a ra Clov en-dro d'e blas e-kichen ar gador)* Ro din ur pallenn, skornet on.

Clov N'eus pallenn ebet ken.

(Ehan)

Hamm Ro din ur pok. *(Ehan)* 'Fell ket dit reiñ din ur pok ?

Clov Nann.

Hamm War va zal.

Clov Ne roin dit pok ebet e neblec'h.

(Ehan)

Hamm *(oc'h astenn e zorn)* : Ro din da zorn d'an nebeutañ.
(Ehan) Ne fell ket dit reiñ din da zorn ?

Clov Ne douchin ket ac'hanout.

(Ehan)

Hamm Ro din ar c'hi. *(Sellout a ra Clov pelec'h emañ ar c'hi)*
Nann !

Clov 'Teus ket ezhomm eus da gi ?

Hamm Nann.

Clov 'Maon o vont neuze da reiñ anezhañ dit.

Hamm *(stouet e benn, o soñjal e traoù all)* : Gwir eo. *(Mont a ra Clov war-zu an nor, treiñ a ra e gein).*

Clov Ma ne lazhan ket ar razhedenn-se, e varvo.

Hamm *(evel a-raok)* : Gwir eo. *(Mont a ra Clov kuit. Ehan)*
Din-me da c'hoari. *(Tennañ a ra e frilien, displegañ 'ra anezhañ, hag e talc'h anezhañ displeget dirazañ)* War goshaat ez eomp. *(Ehan)* Leñvet 'vez, leñvet 'vez c'hoazh, evit netra, evit chom hep c'hoarzhin, ha tamm ha tamm... Setu an dristidigezh o tont. *(Plegañ 'ra ar frilien, adlakaat 'ra anezhañ en e c'hodell, sevel a ra e benn)* An holl re am bije dleet sikour. *(Ehan)* Dleet sikour ! *(Ehan)* Saveteiñ. *(Ehan)* Saveteiñ ! *(Ehan)* Amañ e oa leun diouto en-dro din. *(Ehan. Taer)* Soñjit un tammig, me ho ped, soñjit un tammig, war an douar emaoch, n'eus tra d'ober. *(Ehan)* Skarzhit kuit ac'han hag en em garit an eil egile ! Lipit hoc'h amezeg evel m'en em lipit c'hwi hoc'h-unan ! *(Ehan. Siuloc'h)* Pa ne oa ket bara e felle dezho kaout, e oa krampouezh dous. *(Ehan. Taer)* Pell diouzhin an holl ac'hanoc'h, hag it en-dro da c'hoari-daou ! *(Ehan)* Kement-se ! Kement-se ! *(Ehan)* Pas zoken ur c'hi gwir ! *(Siuloc'h)* En deroù 'mañ an termen ha koulskoude e vez kendalc'het da vont. *(Ehan)* Marteze e c'hellfen kenderc'hel gant ma istor, echuiñ anezhañ ha kregiñ gant unan all. *(Ehan)* Marteze e c'hellfen en em deurel war al leur. *(En em*

sevel a ra gant poan diouzh ar gador, evit kouezhañ enni en-dro) Plantañ ma ivinoù er rujennoù hag en em stlejañ war-bouez ma daou zorn. *(Ehan)* Ar fin e vo, hag amañ e vin, o 'n em c'houlenn petra en deus graet dezhañ dont hag o 'n em c'houlenn petra an diaoul en deus... *(Termal a ra)* ...Perak eo bet ken pell o tont. *(Ehan)* Amañ 'vin, en toull-gwarez kozh, ma-unan a-benn gant an dilavar hag... *(Termal a ra)* ...an didrouz. Ma c'hellfen chom peoc'h, chom sioul em c'hoazez e vefe echu gant an treuz, ha gant ar fiñv, echu gant pep tra da vat ha da viken. *(Ehan)* Galvet em bo ma zad ha galvet em bo ma... *(Termal a ra)* ...ma mab. Zoken div, pe deir gwech, ken kaz n'o dije ket klevet ac'hanon, ar wech kentañ, pe an eil. *(Ehan)* Lavarout a rin din ma-unan : distreiñ a raio. *(Ehan)* Ha neuze ? *(Ehan)* Ne c'hell ket, re bell eo aet. *(Ehan)* Ha neuze ? *(Ehan. Pennfollet)* Sorc'hennoù a bep seurt ! E vez sellet ouzh kement tra a ran ! Ur razhedenn ! Pazioù ! Un den o terc'hel war e anal ha neuze... *(Dianalat a ra)* Neuze, kaozioù, kaozioù, gerioù, evel ar bugel e-unan-penn en em lak da vezañ bugale, daou, tri, evit bezañ a-gevret, ha kuzulikat kenetrezo, en deñvalijenn. *(Ehan)* Munutenn goude munutenn, o tiverañ, evel greunennoù mil... *(Termal a ra)* ...gant ar gresian-kozh-se, hag ar vuhez-pad e c'hortozit e savfe ar bern da vezañ ur vuhez. *(Ehan. Digeriñ 'ra e veg evit kenderc'hel, ne ra ket)* A echuomp ganti a-benn ar fin. *(C'hwitellat a ra. Dont a ra Clov gant an dihuner. Chom a ra a-sav e-kichen ar gador)* Petra ? Na marv nag aet kuit ?

Clov Dre va spered hepken.

Hamm Petra, marv pe aet kuit ?

Clov An daou.

Hamm Pell diouzhin e vefes marv.

Clov Ar c'hontrol ivez 've gwir.

Hamm Er-maez ac'han eo ar marv ! *(Ehan)* Hag ar razhedenn ?

Clov Aet eo kuit.

Hamm N'hell ket mont gwall bell. *(Ehan. Enkrezet)* Eñ ?

Clov N'he deus ket ezhomm da vont pell.

(Ehan)

Hamm Hag-eñ n'eo ket poent din kemer ma louzoù a-enep ar boan ?

Clov Eo, poent eo.

Hamm A ! A-benn ar fin ! Ro din anezhañ ! Buan !

(Ehan)

Clov N'eus ket mui a louzoù a-enep ar boan.

(Ehan)

Hamm *(sebezet)* : Mat !... *(Ehan)* Tamm louzoù ebet ken !

Clov Tamm louzoù ebet ken. Biken ken n'az to louzoù a-enep ar boan.

(Ehan)

Hamm Met ar voestig vihan ront. Leun e oa !

Clov Ya. Met bremañ eo goullo.

Ehan. Kregiñ a ra Clov da vont ha da zont er gambr. Emañ o klask ul lec'h bennak evit lakaat an dihuner.

Hamm (izel) : Petra 'rin ? (Ehan. Youc'hal a ra) Petra 'rin ?
(Gwelout a ra Clov ar skeudenn, tennañ anezhi, lakaat anezhi war al leur, troet ouzh ar voger, hag e lak an dihunter e-stribilh en he flas) Petra 'rez ?

Clov Adsevel an dihunter.

Hamm Sell ouzh an douar.

Clov Adarre !

Hamm Peogwir 'mañ o c'hervel ac'hanout.

Clov Poan gourlañchenn 'teus ? (Ehan) C'hoant 'teus da gaout ur bastilhezenn ? (Ehan) 'Teus ket ? (Ehan) Trist eo.

Mont a ra Clov, en ur vousekanañ, war-zu ar prenestr dehou, chom a ra a-sav dirazañ, sevel a ra e sell warnañ.

Hamm Arabat dit kanañ !

Clov (o treiñ war-zu Hamm) : N'eus ket mui ar gwir ken ?

Hamm Nann.

Clov Penaos ez echuo neuze ?

Hamm C'hoant 'teus ez echufe ?

Clov C'hoant kanañ 'm eus.

Hamm N'hellen ket mirout ouzhit.

Ehan, Treiñ a ra Clov war-zu ar prenestr dehou.

Clov Petra 'm eus graet gant ar skeul-se ? (Klask a ra en-dro dezhañ) 'Teus ket gwelet ar skeul ? (Gwelout 'ra

anezhi) Ha poent oa. (Mont a ra war-zu ar prenestr kleiz). A-wechoù 'n em c'houlennan hag-eñ emañ ma fenn ganin. Goude e tremen, hag e teu din ma skiant-vat en-dro, evel a-raok. (Pignat 'ra war ar skeul, sellout a ra dre ar prenestr) Doue, dindan an dour emañ ! (Sellout a ra) Penaos e c'hell bezañ ? (Astenn a ra e c'houzoug, o lakaat e zorn a-us d'e zaoulagad) N'eus ket glav. (Frotiñ 'ra ar werenn, sellout a ra, ehan) A, pebezh genaoueg on ! War an tu fall emañ ! (Diskenn a ra, ober a ra un nebeut pazioù war-zu ar prenestr dehou) Dindan an dour ! (Distreiñ a ra da gemer ar skeul) Pebezh genaoueg on ! (Kas a ra ar skeul war-zu ar prenestr dehou) A-wechoù en em c'houlennan hag-eñ emañ ma skiant-vat ganin. Neuze e tremen, ha ken speredek hag a-raok en em gavan. (Lakaat 'ra ar skeul dindan ar prenestr dehou, pignat a ra warni ha sellout dre ar prenestr. Treiñ a ra war-zu Hamm) Peseurt tachenn douar out dedennet ganti ? Pe neuze an dra en e bezh ?

Hamm An dra en e bezh.

Clov Ar gwel dre vras ? Gortoz ur vunutenn.

Sellout a ra dre ar prenestr. Ehan.

Hamm Clov !

Clov (prederiet) : Mmm.

Hamm Te oar petra eo ?

Clov (evel a-raok) : Mmm.

Hamm Morse n'on bet amañ. (Ehan) Clov !

Clov (o treiñ war-zu Hamm, kounnaret) : Petra 'zo ?

Hamm N'on bet morse amañ.

Clov Chañs 'teus.

Sellout a ra dre ar prenestr.

Hamm Morse n'on bet war al lec'h, morse. Pep tra 'zo c'hoarvezet hepdon. N'ouzon ket petra 'zo c'hoarvezet. (Ehan) Goût a rez petra 'zo c'hoarvezet ? (Ehan) Clov !

Clov (o treiñ war-zu Hamm, kounnaret) : C'hoant 'teus e sellfen ouzh ar bern teil-se, ya pe nann ?

Hamm Respont din da gentañ.

Clov Petra ?

Hamm Goût a rez petra 'zo c'hoarvezet ?

Clov Pevare ? Pelec'h ?

Hamm (taer) : Pevare ! Petra 'zo c'hoarvezet ! Soñj un tammig 'ta ! Petra 'zo c'hoarvezet ?

Clov Petra an diaoul a vern ?

Sellout a ra dre ar prenestr.

Hamm N'ouzon ket.

Ehan. Treiñ a ra Clov war-zu Hamm.

Clov (kalet) : P'he deus Peg ar vamm-gozh goulennet eoul diganit evit he c'hleuzeur ha pa 'teus lavaret dezhi mont da sutal, e ouies petra oa o c'hoarvezout neuze, nann ? (Ehan) Goût a rez gant petra eo marv Peg ar vamm-gozh ? Gant an deñvalijenn eo marv.

Hamm (gwan) : N'em boa banne eoul ebet.

Clov Eo, be' toa.

(Ehan)

Hamm Ganit 'mañ al lunedenn ?

Clov N'emañ ket, sklaer a-walc'h eo evel-se.

Hamm Kae da gerc'hat anezhi.

Ehan. Serrin a ra Clov e zaoulagad, sevel e veilhodorn. Darbet eo dezhañ kouezhañ, pegin a ra er skeul. Kregin a ra da ziskenn, chom a ra a-sav.

Clov Un dra 'zo na gomprenin biken. (Diskenn a ra) Perak e sentan ouzhit bepred. Hag-eñ e c'hellfes displegañ an dra-se din ?

Hamm N'hellfen ket... Marteze eo dre druet. (Ehan) Ur seurt truez don. (Ehan) O, ne gavi ket anezhi aes, ne gavi ket anezhi aes. (Ehan. Kregin a ra Clov da vont ha da zont er gambr, o klask al lunedenn)

Clov Aet on skuizh gant an tabutoù, skuizh-bras. (Klask a ra) 'Maout ket azezet warni ?

Fiñval a ra ar gador, teurel ur sell 'lec'h e oa ar gador, hag e peg adarre da furchal.

Hamm (enkrezet) : Na levez ket ac'hanon amañ ! (Fuloret, e lak Clov ar gador en-dro en he flas) Dres e-kreiz emeon ?

Clov Ur werenn-greskin a vefe ret kaout evit kavout... (Gwelout a ra al lunedenn) A, poent oa !

Dastum a ra al lunedenn, pignat a ra war ar skeul, treiñ a ra al lunedenn war-zu an diavaez.

Hamm Ro din ar c'hi.

Clov (*o sellout*) : Peoc'h !

Hamm (*fuloret*) : Ro din ar c'hi !

Lezel a ra Clov al lunedenn da gouezhañ ha sevel e zaouzm d'e benn. Ehan. Diskenn a ra buan-habuan, klask a ra ar c'hi, gwelout a ra anezhañ, kemer anezhañ, redek war-zu Hamm, ha skeiñ kalet war e benn gant ar c'hi.

Clov Dal, setu da gi !

Kouezhañ 'ra ar c'hi war al leur. Ehan.

Hamm Skoet en deus warnon !

Clov Kas a rez ac'hanon foll, foll on !

Hamm Ma fell dit skeiñ warnon, sko gant ar vouc'hal. (*Ehan*)
Pe gant ar vazh-krog, sko warnon gant ar vazh-krog.
Pas gant ar c'hi. Gant ar vazh-krog. Pe gant ar vouc'hal.

Dastum a ra Clov ar c'hi hag e ro anezhañ da Hamm, hag hennezh a gemer ar c'hi en e zivrec'h.

Clov (*oc'h aspediñ*) : Paouezomp da c'hoari !

Hamm Biken ! (*Ehan*) Lak ac'hanon em serj.

Clov N'eus serj ebet ken.

Hamm Neuze ra teufe ar fin ! (*Mont a ra Clov war-zu ar skeul*) Gant un taol ! (*Pignat a ra Clov gant ar skeul, diskenn adarre, klask al lunedenn, gwelout a ra anezhi, pignat war ar skeul ha sevel al lunedenn*) Gant un taol teñvalijenn ! Ha me ? Ha den n'en deus bet morse truez ouzhin ?

Clov (*o stouiñ al lunedenn hag o treiñ war-zu Hamm*) : Eus ouzhon emao'h ?

Hamm (*fuloret*) : Etre va zog ha me oa an traoù, tamm marmouz ! Morse ne 'teus klevet lavarout e c'helle un den komz outañ e-unan, etre e dog hag eñ e-giz e vez lavaret ? (*Ehan*) 'Maon oc'h embregiñ evit va zamm kaoz diwezhañ ganin va-unan.

Clov Lavarout a ran dit. 'Maon o vont da sellout ouzh an teil-se peogwir eo an urzh. Met ar wech diwezhañ eo. (*Treiñ a ra al lunedenn war-zu an diavaez*) Sellomp 'ta. (*Fiñval a ra al lunedenn*) Netra... Netra... Mat... Mat... Netra... Ma... (*Skrijañ 'ra, stouiñ a ra al lunedenn, sellout a ra pizh outi, ha treiñ anezhi en-dro war-zu an diavaez. Ehan*) Kaoc'h evitañ !

Hamm Diaesterioù all ! (*Diskenn a ra Clov*) Spi am eus n'eo ket un taol dre zindan.

Kas a ra Clov ar skeul tostoc'h ouzh ar prenestr, pignat a ra warni, ha treiñ al lunedenn war-zu an diavaez.

Clov (*sebezet*) : Lavaret e vije ur paotrig bihan.

Hamm (*goapaer*) : Ur paotrig bihan !

Clov Me 'zo o vont da welout. (*Diskenn a ra, lezel a ra al lunedenn da gouezhañ, mont a ra war-zu an nor, distreiñ a ra*). Ar vazh-krog a gasin.

Klask a ra ar vazh-krog, gwelout a ra anezhi, kemer anezhi, ha buan e ya war-zu an nor.

Hamm Nann !

Chom a ra Clov a-sav.

Clov Nann ? Unan a c'hellfe genel bugale all ?

Hamm Ma'z eus anezhañ, e varvo eno pe e teuio amañ. Ha ma n'eus ket anezhañ...

(Ehan)

Clov Ne gredez ket ac'hanon ? Soñjal a ra dit emañ o kontañ koñchennoù ?

(Ehan)

Hamm Ar fin eo, Clov, deut omp d'ar fin. N'em eus ket ezhomm ac'hanout ken.

(Ehan)

Clov Gwell-a-se evidout.

Mont a ra war-zu an nor.

Hamm Lez ar vazh-krog ganin.

Reiñ a ra Clov ar vazh-krog dezhañ, mont a ra war-zu an nor, chom a-sav, sellout ouzh an dihuner, kemer anezhañ, klask ur plas gwelloc'h evit e lakaat, mont betek ar poubellennoù, lakaat anezhañ war golo poubellenn Nagg. Ehan.

Clov Me 'zo o vont kuit.

Mont a ra war-zu an nor.

Hamm A-raok mont kuit... (*Chom a ra Clov a-sav e-kichen an nor*) ...lavar din un draig bennak.

Clov N'em eus netra da lavarout.

Hamm Un nebeudig gerioù... da brederiañ... em c'halon.

Clov Da galon !

Hamm Ya. (*Ehan. Gant nerzh*) Ya. (*Ehan*) Gant ar peurrest, er fin, er skeudoù, an hiboudoù, an holl drubuilhoù,

evit echuiñ. (*Ehan*) Clov... Morse n'en deus komzet din. Neuze, er fin, a-raok mont kuit, hep m'em bije goulennet digantañ, en deus komzet din. Lavaret en deus...

Clov (*gant dic'hoanag*) : A...

Hamm Un draig bennak... o tont eus da galon.

Clov Ma c'halon !

Hamm Un nebeudig gerioù... o tont eus da galon.

(Ehan)

Clov (*kollet e sell, unton e vouezh, troet war-zu ar sal*) : Lavaret o deus din : Karantez eo an dra-se, ya, ya, hep mar ebet, bremañ, gwelout a rit penaos...

Hamm Distag fraezh !

Clov (*evel a-raok*) : Pegen aes eo. Lavaret o deus din : Bezañ keneil eo an Dra-se, ya, ya ; n'eus kudenn ebet, kavet 'teus. Lavaret o deus din : Amañ 'mañ al lec'h, chom a-sav, sav da benn ha sell ouzh an holl gaerder-mañ. An urzh-se ! Lavaret o deus din : Deus bremañ, n'out ket ul loen gouez, soñj en traoù-se hag e weli na pegen sklaer o teuio da vezañ. Hag eeun ! Lavaret o deus din : Pegen barrek e vez graet war o zro, an holl re-se o vervel diwar o gloazioù.

Hamm A-walc'h !

Clov (*evel a-raok*) : Lavarout a ran ouzhin va-unan... a-wechoù, Clov, eo ret dit deskiñ gouzañv gwelloc'h eget se ma fell dit ez afent skuizh o kastizañ ac'hanout... un deiz bennak. Lavarout a ran ouzhin va-unan... a-wechoù, Clov, eo ret dit bezañ amañ gwelloc'h eget se, ma fell dit e lezfent ac'hanout da vont kuit... un

deiz bennak. Met re gozh 'n em santan, ha re bell, evit kemer boazioù nevez. Mat, biken ne echuo, biken ne yin kuit. (Ehan) Neuze, un deiz, a-daol-trumm, ez echu, e kemm, ne gomprenan ket, mervel a ra, pe me an hini a varvo, ne gomprenan ket an dra-se kennebeut. Ober a ran goulennou ouzh ar gerioù a chom c'hoazh... kousket, sevel, mintin, noz-vezh. N'o deus netra da lavarout. (Ehan) Digeriñ a ran dor an toull-kambr hag ez an. Den krommet on ken ne welan nemet ma zreid, ma teuan da zigeriñ ma daoulagad, hag etre ma divesker ur roudennad vihan poucher du. Lavarout a ran ouzhin va-unan eo lazhet goulou ar bed, daoust ma n'em eus morse gwelet anezhañ war enaou. (Ehan) Aes eo mont kuit. (Ehan) Pa gouezhin, e leñvin d'an eürusted.

Ehan. Mont a ra war-zu an nor.

Hamm Clov ! (Chom a ra a-sav, hep treiñ e gein) Netra. (Mont a ra Clov war-raok) Clov !

Chom a ra Clov a-sav, hep treiñ e gein.

Clov Setu pezh a vez anvet mont kuit.

Hamm Trugarez a lavaran dit, Clov. Evit an doare 'teus ser-vijet ac'hanon.

Clov (o treiñ, taer e vouezh) : A, digarez, me an hini eo a lavar trugarez dit.

Hamm Ret eo deomp lavarout trugarez an eil d'egile. (Ehan. *Mont a ra Clov war-zu an nor*) Un dra all c'hoazh. (Chom a ra Clov a-sav) Ur servij diwezhañ. (Mont a ra Clov er-maez) Golo ac'hanon gant al liñser. (Ehan hir) Ne ri ket ? Mat. (Ehan) Din-me da c'hoari. (Ehan. *Skuizh*) Setu echu ar c'hoari kozh kollet abaoe pell, c'hwi a c'hoari, c'hwi a goll, hag a-benn ar fin oc'h echu da goll. (Ehan. *Buhezekoc'h*) Sellomp 'ta.

(Ehan) A ya ! (Klask a ra fiñval ar gador war-bouez ar vazh-krog evel a-raok. Dont a ra Clov, gwisket evel unan a ya da veajiñ. Un tog panama, ur chupenn tweed, ur vantell-c'hlav war bleg e vrec'h. Un dis-glavier, ur sac'h. Chom a ra a-sav e-kichen an nor hag aze e chom dizamant ha difiñv e sell paret war Hamm betek ar fin. Paouez a ra Hamm da glask fiñval) Mat. (Ehan) Lez da gouezhañ. (Teurel a ra kuit ar vazh-krog, 'mañ o vont da deurel kuit ar c'hi, met kemm a ra menoz). Arabat fuloriñ. (Ehan) Ha bremañ ? (Ehan) Savomp an tog. (Sevel a ra e voned) Peoc'h d'hor... revriou. (Ehan) Lakaomp en-dro. (Adlakaat a ra e voned war e benn) Taol gwenn. (Ehan. *Tennañ a ra e lunedoù*) Torchit anezho. (Tennañ a ra e frilien hag, hep displegañ anezhañ, e torch al lunedoù) Ha lakait anezho en-dro. (Adlakaat a ra al lunedoù war e fri, hag ar frilien en e c'hodell) Dont a reomp dezhi. Un nebeut jestroù sot all eus ar seurt-se c'hoazh hag e c'halvin. (Ehan) Un tamm barzhoniezh. (Ehan) Pedet hoc'h eus... (Ehan. *Reizhañ 'ra ar ger*). YOUC'HET hoc'h eus evit ma teufe an noz : deut eo... (Ehan. *Reizhañ a ra ar ger*) KOUZEHET eo : bremañ youc'h hit en deñvalijenn. (Lavarout a ra en-dro, o tis-kanañ) Youc'h et ho peus evit ma teufe an noz ; kouezhañ 'ra ; bremañ youc'h hit en deñvalijenn (Ehan) Kavet brav, an dra-se. (Ehan) Ha bremañ ? (Ehan) Mareoù evit netra, evel atav, morse n'eus bet a amzer hag echu eo an amzer, klozet ar c'hontoù hag echu an istor. (Ehan. *Mouezh an den o kontañ*) Ma c'hellfe e vogel bezañ gantañ... (Ehan) Ar mare-se oan bet o c'hortoz. (Ehan) 'Teus ket c'hoant dilezel anezhañ ? C'hoant 'teus e teufe da zen e-pad ma vi-te o vont da gozh ? E vefe-eñ en da gichen evit reiñ frealz d'az milionoù diwezhañ a vunutennoù diwezhañ ? (Ehan) Ne gompren ket, ne anavez netra nemet an naon, ar yenijenn, hag ar marv evit klozañ pep tra. Met te ! Te a zlefe gouzout penaos emañ an douar en deiz a hiziv. O, lavaret 'm eus dezhañ petra oa en e giriegezh. (Ehan. *Mouezh ordinal*) Ma, amañ 'maomp, amañ

'maon, a-walc'h eo. (Sevel 'ra ar c'hwitell d'e vu-
zelloù, termal a ra, lezel a ra anezhañ da vont. Ehan)
Ya, e gwirionez ! (C'hwitellat a ra. Ehan. Kreñvoc'h,
Ehan) Mat. (Ehan) Tad ! (Ehan) Mat. (Ehan) 'Maomp
o tont. (Ehan) Hag evit echuiñ ? (Ehan) Lez da
gouezhañ. (Teurel a ra ar c'hi kuit. Diframmañ a ra
ar c'hwitell eus e gerc'henn) Gant ma gourc'he-
mennoù. (Teurel a ra ar c'hwitell war-zu ar sal. Ehan.
Difronkañ a ra. Izel) Clov ! (Ehan hir) Nann ? Mat.
(Tennañ a ra e frilien) Peogwir eo evel-se e vez c'hoa-
riet bremañ... (Displegañ a ra ar frilien) ...c'hoariomp
'ta evel-se... (Displegañ a ra atav) ...hag arabat ober
trouez ken gant se... (Echuiñ a ra displegañ ar frilien)
...arabat komz ken. (Derc'hel a ra ar frilien ledet
dirazañ) Kozh stranker ! (Ehan) Te a... chom.

Ehan. Goleiñ a ra e fas gant ar frilien, diskenn a ra e
zivrec'h war divrec'h ar gador, hag e chom difiñv-mik.

Taolenn verr.

Ar ouel a gouezh

